

**Breuriez Breiz-Izel,**  
savet e Montroulez  
An 31 a viz Eost 1869

**Kenvreuriez Breiz-Izel**

*(Modernnaet eo bet an doare-skriva). (Adskrivet em-eus ar pennad-se e-keñver istor)*

**Taolenn**

*(N'eo ket bet adskrivet an oll bennadou. Diêz eo lenn al leor orin, pa oa bet moulllet fall).*

Kenvreuriez Breiz-Izel

Ar Yann. G. Milin. An Uhel. Proux. J.P.-M. Ar Skour. (*Frazennou ganto*).

Ar Yann. Milin. F.M. An Uhel. Proux. J.P.M. Ar Skour. (D'ar re o-deus klevet)

Fañch an Uhel : Ar falher.

Ar Skour : Bennoz deoh, ma Doue

Ar Yann : Aliou eur vamm d'he bugale.

Janedig Ar Rouz.

Markiz Trede.

Markiz Trede (doare all).

Marivonig.

Yannig ar "bon garçon".

Silvestrig.

An aotrou Rozmadeg.

Pontplañkoad.

Renea Ar Glaz

Kalon Dir : Ma bro.

Gab Liskildry : Stign da delenn.

Jean Guillou : An dasprener.

Chanson nevez : ano oberour ebed.

Chañson ar big : ano oberour ebed.

(Taoc ha Merrer) : Gwerz truezuz war sujed eur bugel yaouank A zo bet tri bloaz dindan ar Pazennou 1881

René Ar Barz (genidig a Landreger) : Chañson war sujed An Ostiz liper

Son eun Den yaouank a zo bet trahiset gand e vrasa mignon (ano oberour ebed).

-----  
Gwillou Merer : Chañson nevez kompozet D'ar wazed yaouank Kanton Lanneur. (gweled roll Embann an Hirwaz).

V. Koad : Bugale Breiz-Izel (gweled roll Embann an Hirwaz).

An 31 a viz Eost diweza, al lizer a zo amañ war-lerh a zo bet kaset d’eun niver braz a dud ouizieg euz a Vreiz ; hag oll o-deus degemeret mad ar mennoziou a zo e-barz. Hogen o veza ma oad en em gemeret re ziwevad da rei kelou euz ar pezh a oa c’hoant da ober, bez’ a zo ha n’o-deus ket gallet dond, koulskoude an darn vuia a zo bet hast vraz warnezo da zegas deom lizeriou kaer, ken e galleg, ken e brezoneg, ha kaoud a rajer o lkaadoll amañ. O veza n’hen heller ket, plijet ganto kavoud mad e larfem eun draig bennag da vihanna euz ar pezh o-deus skrivet deom.

Setu amañ al lizer a zo bet kaset en-dro :

KENVREUDEUR GEZ,

Degouezet eo an amzer ma tleom en em glask, hag en em zastum oll evid en em anavezoud gwelloc’h, en em garoud hag en em glevet evid mad ar vro hag on yez koz, ar brezoneg. Red eo ma ouezo pep hini en pep korn Breiz-Izel ha Bro-Hall ivez n’om ket maro c’hoaz, evel a lavar kalz, hag ez om beo-buhezeg ha beo ivez en on touez spered ha skiant on tadou-koz.

En em glevom eta, en em garom ha bezom unan oll, ha marteze Breiz-Izel a raio c’hoaz komz anezi.

N’eus netra falloh evid en em zerhel bepred pell an eil euz egile o veza n’en em anavezer ket. A-hend-all, oh en em zerhel pep hini en e gêr, dibaot eo ma reer eun dra bennag a vad, evel pa en em weler aliez, pa en em gelenner a galon vad, pa en em garer en eur ger. Gwad eur Breton a dle en em domma diouz gwad eur Breton all, hag oll e tleom en em harpa evel gwir vreudeur, evid mad pep hini hag an oll, a-dreist pep tra, evid enor ha mad ar vro hag or yez koz, ar Brezoneg.

Gwella zo da ober bremañ evid kement-se eo en em zastum eur wech an amzer – eur wech ar bloaz – ma ve kavet mad, en eur gêr bennag a Vreiz-Izel, evid en em weled, serri a galon dorn pep hini, en em anaoud, en em garoud, en em glevet war gement a zell ouz mad ar yez, hag ouz or bro Breiz. Goude-ze kana pep hini e werz pe e zon neuze, kimiada an eil diouz egile evel breudeur, o lavared : Kenavo bloaz, breur ker !

E meur a leh e weler ober ze ; evel-se e ra or breudeur euz an tu all d’ar mor. Greom evelto, pedom spered on tadou-koz da veza ganeom bepred, pedom Doue<sup>2</sup> ivez ma teuo pep tra da vad.

Pa vezim oll dastumet evid ar wech kenta, en em glevfom war an oll draou-ze ha war kalz a draou all ne gomzom ket aneze amañ. Ne houlennom en on touez nemed gwir Vretoned, a gomz pe a skriv yez or bro hag a gar anezi evel o mamm.

An 31 aviz Eost 1869, e pedom ahnaoh da en em gavoud en kêr Montroulez evdi en em glevet etrezom ha klask an tu da ober eur Vreuriez Breiz-Izel kreñv ha paduz ; starda dorn peb mignon a vo greet eno, komz brezoneg ha kana.

Ha goude kimiada, mignoned oll o lavared :

Kenavo da vloaz !

(*E Montroulez, ar 14 a viz Eost 1860*)

Ar Yann. G. Milin. An Uhel. Proux. J.P.-M. Ar Skour.

-----

Plijadur vraz a ra din gweled evel-se eun tamm buhez o sevel e kalon ar Vreizidi, ar re<sup>3</sup> a gar c’hoaz or bro hag ar brezoneg, yez on tadou.

Y. K. Kersale (beleg ar Zalet)

<sup>1</sup> eur feiz : An diou genta (eur galon, eur yez) a zo mad. Eur feiz a zo a re.

<sup>2</sup> pedom Doue : ar re a gred ez eus eun Doue, evel just.

<sup>3</sup> ar re pere, er skrid orin.

Gand kalz a levez e welan ahanoh poaniad gand ar brezoneg, Aotrounez, hag e pedin Doue, ar Werhez, d'ho pennigañ.

M.-P. Kemar Person Sant Laorañs.

Plijadur ha levez d'an oll Varzed a yey, d'an deiz-se, d'ho kweled.

J. V. Jonkour. Beleg skolaj Plougernevel.

Me 'zo hag a vo da viken  
Gand eur galon hwek ha dibrenn  
Ho mignon J. L. Queynec  
A gar meurbed ar brezoneg

J. L. Queynec. Person ar C'hloastr.

Lennet em-eus penaoz Homer,  
Ar brasa euz an oll Varzed,  
En e gozni leun a vizer,  
A gollas siwaz, ar gweled !...

Ar Barz yee a zor da zor  
Gand e gi evid klask e voued ;  
A-zaelou e rede eur mor  
War e ziu valvenn dizehet.

Le Joubioux.

Netra ne ra mui a blijadur din eged gweloud an dud a skiant oh ober stad euz or brezoneg hag euz or Breiz muia-karet. Mar savit eur Vreuriezh etrezoh da skoazia hag enori or yez, e vezin unan euz ar genvredeur.

Yann Willlou Herry, Beleg, klañvdi Kemperle.

Eur blijadur vraz e ve eviodn en em gaoud gand tud gouizieg ha kaloneg ar re<sup>4</sup> a labour gand kement a sked evid astenn buhez or brezoneg a ya d'arbez evel eur vamm dilezet gand he bugale.

Perrot, person Taole.

Trugarez deoh da veza degaset din eul lizer, evid ma fedi da 'n em gavoud an 31 a viz Eost, er gêr a Vontroulez.

A. Dubourg. beleg skolaj Landreger.

---

<sup>4</sup> ar re : pere, er skrid orin.

## D'ar re o-deus klevet

*War don ar Variadonig*

Ni ho trugareka meurbed  
A-greiz or halon, mignoned. (*bis*)

Pa'z oh deuet da Vontroulez  
Da zikour sevel ar Vreuriez.

A alon vad hoh-eus lennet  
Ar pezh or-boa deoh-hu skrivet.

Ha gwir vugale Vreiz-Izel,  
Amañ oh deredet a bell.

Eur galon eo or halonou,  
Eur gwad eo gwad or gwaziou.

Hag or harantez evid Breiz  
A zo ker paduz hag or feiz.

Ar brezoneg, yez on tadou  
A zeskas deom or mammou.

Ma tisprizfem yez Vreiz-Izel  
Ni a zisprizfe or havell.

Gand eur vamm 'vel eh om ganet  
Ha gand dour santel badezet.

A-bell, a-dost, ni 'zo eur ouenn  
Bretoned vad, koulz kristenien.

Evel breudeur, bemdez bevom  
Evel breudeur en em garom.

Dalhom bepred da yez or bro  
Ha meuleudigez or-bezo.

Kreñvoh eo daou eged unan  
Red eo boud kalz da laza tan.

Bezom eur horv hag eur spered  
Or Breuriez a bado bepred.

Mad eo bremañ kuzulika,  
Da bep hini lared e dra.

Hogen a-raog trei al lañchenn  
Azezom kichenn ha kichenn.

Ni ho trugareka meurbed  
A-greiz or halon, mignoned.

Pa'z oh deuet da Vontroulez  
Da zikour sevel ar Vreuriezh.

On anaoudegez vad 'zo braz  
Hag or harantez brasoh c'hoaz.

Ar Yann. Milin. F.M. An Uhel. Proux. J.P.M. Ar Skour.

**Ar falher.** An Uhel (*gweled Embann an Hirwaz*).

---

## **Bennoz deoh, ma Doue**

*Gloria in excellis Deo.*

*War don Gralon ha Kêr-Iz.*

O ! ma Doue<sup>5</sup>, c'hwi a zo mad !  
Roet hoh-eus din eru vamm vad.  
Eur vamm meurbed karantezuzs,  
Evel ho Mamm, Salver Jezuz.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Roet hoh-eus din eun êl mad,  
'Zo diskennet euz ho palez,  
'Vid ma hentcha 'pad ma buhez.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Roet hoh-eus din sant Egarad,  
Sant Egarad evid Patron ;  
'Veltañ ra vin kristen gwirion !

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Dre ho kras me a zo Breizad :  
Breizad, ha Kristen me a vo.  
Kristen, Breziad, bete 'r maro !

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Roet hoh-eus din boued ha dillad,  
Evel d'al labousig bihan  
E-pad ma hañv deoh-hu a gan.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
N'hallfen ket hoh ankounac'haad,  
Roet hoh-eus din eun ene,  
Evid ho karoud, ma Doue !

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Gweled 'ran gand ma daoulagad,  
An heol, al loar hag ar stered,  
Hag an traou kaer hoh-eus krouet.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Roet hoh-eus din mignoned ervad,  
Kerloc'h<sup>6</sup>, Daniel<sup>7</sup>, an eskob Gwenn<sup>8</sup>,

---

<sup>5</sup> ma Doue

Karis<sup>9</sup>, pevar zant, pevar den.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Ganeoh eo bet harpet ma zroad,  
Hag aliez oh deut d'am divenn  
Ha d'am derhen en ho lezenn.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Bet em-beus, 'veldoh, kalonad ;  
Neuze me 'goueze d'am daoulin.  
C'hwi, ma Doue, 'zelle ouzin !

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Sehet 'h-eus din ma daoulagad ;  
Pa oan pleget gand an anken,  
Ma Doue, c'hwi 'oa em hichenn.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Ped gwech oh deuet evel eun Tad  
D'am zevel diwar an douar,  
Pa gouezen dindan ma glahar.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Roet hoh-eus din ma mennad,  
Pa hoh-eus lakaet em hreiz,  
Karantez, esperañs ha feiz.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Pedet 'm-eus ho mamm e Bulad,  
E Rumengol, e Josselin,  
Hag e Gwengamp, war ma daoulin.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Pa vo serret ma daoulagad,  
Astennit ho torn gand true',  
Salver Jezuz, war ma ene.

O ! ma Doue, c'hwi a zo mad !  
Me a deu d'ho trugarekaad ;  
Gloar deoh, Jezuz, e Breiz-Izel.  
Gloar deoh, Jezuz, gloar eternal !

**J.P. M. Ar Skour**

*Barz an Iton Varia Remengol.*

---

<sup>6</sup> Kerloc'h : Person Hañveg, maro e 1860.

<sup>7</sup> Daniel : Vikel vraz Esopti Kemper, maro e 1868.

<sup>8</sup> Gwenn : Eskob Kemper.

<sup>9</sup> Karis : Barz Menez-Bre, person Plougraz, Maro e 1867.

## Aliou eur vamm d'he bugale

*War don : Santez Mari, Mamm Doue*

Klevit amañ, bugalez,  
Klevit eun ali mad :  
Roit din ho karantez,  
Henez eo ho tlead ;  
Rag Doue a hourhemenn...  
Na vezit ket digar...  
Anez n'ho-pezo biken  
Eurvad ar an douar !...

### *Diskan*

Mamm vad, sehit ho taelou  
Ha bezit laouen c'hoaz,  
Rag ho kwir vugaligou  
Ho karas a-viskoaz.

Eur vamm a ro d'he bugel  
Lêz he bronn d'hen maga ;  
Gwelloh 've ganti mervel  
Ha dilezel pep tra  
Kent evid gweloud he mab  
Re bell en dienez ;  
Euz an oll draou an dibab  
A vezo da hennez.

Gantañ bepred trubuillet  
En noz ne gousk takenn ;  
Kerkent ha m'he-deus klevet  
Gantañ eur grindenn,  
E tilamm euz he gwele  
Evid hen luskella,  
Ha dezañ e ro goude  
Eur banne da eva !...

N'eo ket a-walh hen maga.  
Deski komz a raio,  
Lavared *Mamm* ha *tata* :  
Breton mad e vezo :  
Galvet eo ar hemener  
D'hen gwiska penn-da-benn :  
Bragou braz, chupenn vezer,  
Eur pennad bleo melen !...

Ha goude kemend a boan,  
Bremañ, p'eo eun den kaer,  
Gand ar roue e klevan,



D'ar brezel hen galver...  
Torret en-deus kalz pennou,  
Desket en-deus galleg...  
Allaz ! Doue... ma Aotrou !  
Ne oar mui brezoneg !

Ma flanedenn 'zo kaled ;  
Setu petra 'hoarve' :  
Bugalez em-eus ganet  
Ha n'on ket evite ;  
Bremañ e komzont galleg,  
Eur yez ken dizano !...  
Ha me a gomz brezoneg...  
Tud digar, it en-dro !...

Me 'zo evel eur goz yar  
O sevel houidi ;  
Pa gerzont war an douar :  
Ez int fier, emezi ;  
Hogen pa'z eont en dour  
Ar vamm baour 'zo spontet ;  
Kemerit da vrezelour  
Ar pezh em-eus laret.

Karit ervad Breiz-Izel,  
Hennez eo ma ano,  
Ha mirit bete mervel  
Yez koz Barzed ho pro,  
Enorit neb ho magas,  
Ho mamm ez eo bepred ;  
Doue hen gourhemennas  
Ha n'ho tilezo ket !...

*Diskan diweza*

Mamm vad, sehit ho taelou,  
Na vezit mui mezeg ;  
Bremañ ho pugaligou  
A gomzo brezoneg.

*Gwengamp. Eost 186,9.*

**I. M. Ar Yann**

# Janedig ar Rouz

*Gwez kenta*

## I

Selaouet oll hag e klevfet  
Eur werz a zo nevez-savet,  
'Zo greet da Janedig Ar Rouz,  
Braoa plah 'vale 'n he farrouz.

Janedig Ar Rouz a lare  
D'he zad, d'he mamm eur zul 'r beure :  
« Red eo lared na oh ket fur,  
Lakaad deiz ma eured d'ar zul ;

Ha c'hwi o klevet a-bell zo  
Ema 'n aotrou Tremblai <sup>10</sup>er vro,  
Ha c'hwi o klevet, o weled,  
'Ma 'ma an aotrou Trembli 'klask ma hwved !

He zad hag he mamm a laras,  
Da Janed 'R Rouz, 'vel ma komzas :  
« Bet droug gand an neb a garo,  
Ho eured d'ar zul a vezo ;

Ho eured 'vezo d'boent an de',  
N'vo ket Tremblai war ar bale... »

## II

Janedig Ar Rouz a lare  
D'an aotrou person 'zul 'r beure :  
« Hastet-c'hwi, aotrou, depechañ,  
C'hweza 'n tan er mech a glevan !é

N'oa ket he ger peurachuet,  
'Oa leun 'n iliz hag ar porched ;  
'Oa leun 'n iliz hag ar porched  
Gand Tremblai hag e zoudarded.

An aotrou Tremblai a lare  
D'an aotrou person, en deiz-se :  
« Atrou 'r person, din-me laret,  
Peleh 'ma ar wreg a eured ?... »

An aotrou person a laras  
D'an aotrou Tremblai, p'hen klevas :

---

<sup>10</sup> Tremblai : **Notenn, e galleg, e-barz al leor orin** : Kabiten ar roue a-eneb ar Zaozon.

« Aotrou Tremblai, ma iskuzet,  
Eureuji d'ar zul ne ran ket.

Eureuji d'ar zul ne ran ket,  
Eur vadeziant eo am-eus greet.é  
« Aotrou person, gaou a laret,  
Janedig Ar Rouz 'h-eus eureujet.

Rentet Janedi 'R Rouz amañ,  
Pe me ho lazo da genta,  
Pe me ho lazo da genta,  
Gand he zad, he mamm 'zo amañ. »

Janedig Ar Rouz a lare  
D'an aotrou Tremblai eno neuze :  
« Aotrou Tremblai, mar am haret,  
Ma lest mond war vur ar vered.

Ma lest mond war vur ar vered.  
,Da lared adieu d'am fried. »  
« War vur ar vered ne yefet ket,  
Diwar lost ma marh, kimiadet ! »

Janedig Ar Rouz a lare  
D'an aotrou Tremblai eno neuze :  
« Ma lest da vond c'hoaz en iliz  
Da gimiadi euz ma broiz. »

« 'Vid en iliz ne yafet ket,  
Diwar lost ma marh kimiafet :  
Ganin teufet war lost ma marh,  
Kriet, garmet, gouelet ho kwallh ! »

Janedig Ar Rouz a lare  
D'an aotrou Tremblai eno neuze :  
« Aotrou Tremblai, mar am haret,  
Eur gontell din-me a rofet. ;

Eur gontell din-me a rofet  
'Vid troha seizenn ma eured,  
'Vid troha seizenn ma eured  
A oa bet warnon re stardet. »

An aotrou Tremblai p'en-deus klevet,  
Teir hontell dezi 'n-eus diskouezet ;  
Unana troad du, unan troa d gwenn,  
Eun all c'hwezet en aour melen.

An hini troad du 'z eo kroget,  
En he halon 'deus-hi plantet !

Pa zistroas 'n aotrou en-dro,  
'Oa Janedig war he genou !

An aotrou Tremblai a lare  
Da Janed Ar Rouz eno neuze :  
« Triweh<sup>11</sup> groug eured 'm-eus laeret,  
Janedig Ar Rouz an naontegved ;

Janedig Ar Rouz, an diweza ,  
'Laka ma halon da ranna !»

*Bet kanet gand Janed ar Gall,deuz Kerarborn e 1848.*

---

<sup>11</sup> Triweh : **notenn e galleg el leor orin** : Aliez e vez impljet *triweh* er hanaouennou –pobl.

# Janedig Ar Rouz

## Eil gwez

### I

Braoa merhed 'zo 'ndan an heol,  
Eo merhed Ar Rouz a Bempoull :  
Janedig 'zo kaer 'vel eur rozenn,  
An diou all 'zo diou rouzadenn.

Janed Ar Rouz a lavare  
D'he zad, d'he mamm,eun deiz a oe :  
« Ma zad, ma mamm, nan'oh ket fur,  
Lakaad ma eured d'ar zul,

Ha c'hwi o kleved a-bell zo  
'Ma kabiten Tremblai er vro ;  
C'hwi o houzoud hag o kleved  
Penaoz emañ 'klask ma haved ! »

He zad neuze a lavaras :  
Da Janed Ar Rouz, p'he hlevas :  
« C'hwi 'vo eureujet 'raog an de',  
'Vo an aotrou Tremblai en e wele. »

### II

Kabiten Tremblai a lare  
D'e bajig bihan en noz-se :  
« Sav warhoaz beure mintin mad  
Ma yefom d'chaseal d'ar hoad ;

Da chaseal rankom moned,  
Janed Ar Rouz 'vo warhoaz eureujet.

### III

Janedig Ar Rouz a lare,  
D'an aotrou person en deiz-se :  
« Hastet gand ho overn-eured,  
C'hweza an an er poultr 'm-eus santet.

C'hweza an an er poultr 'm-eus santet,  
'Ma an aotrou Tremblai o toned. »  
An aotrou person a lare  
Da Janedig Ar Rouz neuze :

« Pa nemed ifom<sup>12</sup> da dillad,  
'M-boa da guzet 'n eun arched-koad,  
Da laket er zakristiri,  
A zo seiz alhwez warnezi. »

---

<sup>12</sup> ifom : louza.

« Ha posubl ‘ve digand Doue,  
‘Ve damant d’am dillad ho-pe !  
Me o harfe oll en eun tantad,  
Me er gêr, war oaled ma zad ! »

N’oa ket he ger peurlavaret,  
‘Oar karget an iliz, ar porched,  
‘Oa karget iliz ha porched  
Gand Tremblai hag e zoudarded.

Kabiten Tremblai a houlenne  
Digand ar person, en deiz-se :  
« Aotrou ar person, din laret  
Peleh ema ‘r plah a eured ? »

« Aotrou Tremblai, ma iskuzet,  
N’eo ket eun eured am-eus greet ;  
N’eo ket eun eured am-eus greet ;  
Eur bugel am-eus badezet. »

« N’eo ket eun eured hoh-eus greet ?  
Peleh ‘ma ar bugel badezet ? »  
« Gand e vagerez ez eo eet,  
‘Vid hen tomma war an oaled. »

« N’eo ket badeziantchou  
‘Ma ‘r bouklou arhant war ‘r botou ;  
‘Ma ‘r bouklou arhant war ‘r botou ;  
An dantelez war ar mañchou ;

Janed Ar Rouz ‘h-eus eureujet,  
Honnez a rankan da gaved ! »  
« Ema ‘barz ar zakritiri,  
A zo seiz alhwez warnezi. »

Kabiten Tremblai a lare  
Da Janedig Ar Rouz neuze :  
« Ha n’az-teus ket a zoñj mad  
Pa oas er gêr, en ti da dad,

Az-poa-te din-me lavaret  
N’ gouskjes ket ganin noz da eured ?... »

\*

Janezig Ar Rouz a lavare  
D’an aotrou Tremblai en deiz-se :  
« Ma lest mond war vur ar vered ;  
Da laerd adieu d’am freid ? »

« Savet pa garfet war ar vur,  
Laret kenavo dezañ sur. »  
Janedig 'r Rouz a lavare,  
War ar vur pa zave :

« Ma fried paour, din-me laret,  
Ma retornan am chomerfet ? »  
« Mar deuet, c'hwi 'vo deuet mad,  
Pa nan eo ket gand ho krad-vad. »

Janed Ar Rouz a houlenne  
Euz kabiten Tremblai neuze :  
« Aotrou Tremblai, din-me laret,  
Ouspenn dah<sup>13</sup> e vin oblijet ? »

« Ha din-me ha d'am faotr a gambr,  
Ha d'am zoudarded p'o-do c'hoant,  
Ha d'am zoudarded p'o-do c'hoant,  
Bez' a zo aneze deg-ha-kant ! »

Janedig Ar Rouz a lare  
D'an aotrou Tremblai en deiz-se :  
« Aotrou Tremblai, mar am haret,  
Eur gontell dn-me a brestfet,

Eur gontell dn-me a brestfet,  
Da droha seizenn ma eured,  
An hini<sup>14</sup> a zo re stardet,  
Gand ar vamm he-deus ma ganet ? »

« 'Vid kontellou ne zougan ket,  
Dalet ma fognar alaouret,  
Da droha seizenn hoh eured,  
Ha lezit hi gand ho pried ! »

E bognar dezi 'n-eus roet,  
En he halon 'deus hañ plantet ;  
En he halon 'deus hañ plantet,  
Hag o koueza he-deus laret :

« N'aje ket da varh soudarded.  
D'an aotrou Tremblai kennebeud. »  
Kabiten Trembali a lare  
Da Janedig eno neuze :

« Te varv 'n eur gwall "intention",  
Doue da rei dit ar pardon :

---

<sup>13</sup> dah : deoh.

<sup>14</sup> An hini : pehini, er skrid orin.

Pe nemed daoni ma ene,  
N'oas ket eet gwerh dirag Doue !

Triweh gwreg eured 'm-eus laeret,  
Ha te a zo an naontegved ;  
Te an naontegved, 'n diweza,  
Laka ma halon da ranna ! »

## VI

Janedig Ar Rouz a lare  
Da dud an eured, en deiz-se :  
« Diotoh 'vidon 'vije kavet,  
Em horv-balan <sup>15</sup>'m-eus hañ plantet ! »

*Bet kanet gand Mari Daniel, parrez Duod.*

---

<sup>15</sup> em horv-balan : **notenn, e galleg, el leor orin** : *corset*, me semble tirer son origine d'un vieil usage de notre pays de Lannion, qui consistait à faire les corsets des paysannes avec de la toile de lin trempée dans une décoction d'écorce de genêt qui la teignait en rouge tirant sur le jaune. Cet usage, aujourd'hui disparu, existait encore il y a trente ans.



# Markiz Trede

## I

Selaouet oll, hag e klevfet  
Eur werz a zo nevez savet ;  
Eur werz a zo nevez savet,  
D'eur plahig yaouank ez e' greet.

D'eur plahig yaouank bet añleuuet  
War hent Leon, 'vond d'ar Yeoded ;  
Añleuuet gand markiz Tredre  
Euz an hent, war e hinkane.

## II

'N aotrou Trede a houlenne  
Euz ar plahig p'he rankontre :  
« Plahig yaouank, din-me laret,  
Peleh ez et pe ez oh bet ? »

« D'ar pardon d'ar Yeoded ez an,  
'Vid koves ha komunian,  
'Vid koves ha komunian,  
Gonid ar pardon, mar gellan. »

'N aotrou Trede a lavaras :  
Eur plah yaouank 'vel m'he hlevas :  
« 'Vid ar pardon, n'ez yelet ket,  
Ganin da Drede e tufet.

Plahog yaouank,me ho tesko  
Da vond hoh-unan dre an hentcho' ! »  
« Salv ho kras, aotrou, iskuzet,  
'N unan euz an hentchou n'ez on ket ;

'N unan euz an hentchou n'ez on ket,  
D'eva dour feunteun 'oan chomet ;  
D'eva dour feunteun 'oan chomet,  
Ha ma re a-raog a zo eet. »

An aotrou Trede a lare  
Na, d'e halefrinier neuze :  
« Didaolez-te din war ma marh,  
Ahane 'tiskouro he gwalh ! »

« Salv ho kras, ma mestr, ne rin ket,  
Glahari 'r plah ne houlennan ket  
N'hellan ket glahari he halon,  
Eur plah fur eo, plah a feson !

'N aotrou Trede 'vel ma klevas,

Diwar e vrah a ziskennas ;  
Diwar e varh eo diskennet,  
Eur fasad d'e baotr 'n-eus roet.

Eur fasad d'e baotr 'n-eus roet,  
A-vriad ar plah eo kroget,  
A-vriad ar plah eo kroget.  
War gein e varh 'n-eus he laket.

Eur mouchouar gwenn ampezet  
War he genou e-neus laket,  
'Vid n' vije anavezet  
'Vid n' vije anavezet  
Gand an dud o vond d'ar Yeoded.

'Ra plahig yaouank a lavare  
A-biou d'he re pa dremene :  
« En an' Doue, mar am haret,  
Kompagnunez, ma zikouret ! »

« Allaz ! ho sikour n'hellom ket,  
P'eo an aotrou Trede 'n-eus ho c'hoantet ! »...  
Ar palefrinier a lare  
Na, d'an aotrou Trede neuze :

« Lemet 'r mouchouar diwar he geno',  
Taoi 'ra ar gwad a-vouchadou ! »  
« Lez 'ta hi da daol 'r pez a garo,  
Ar merhed 'zo leun a zaelo' ! »

*(Doare all :*  
Ar plah yaouank a hirvoude,  
Ne gave den he honzolja,  
Med 'r palefriner a-weziou,  
Gand truez vraz euz he hañvou :  
« Tavet, merhig, ne ouiet ket,  
Me 'viro n'ho-po droug ebed...)

« 'Vid ganin-me ne gouskfet ket,  
Ho kwele 'r gambr uhel 'zo greet ;  
Ho kwele 'r gambr uhel 'zo greet,  
Gand an aotrou Trede da gousked. »

An aotrou Trede a lare  
D'ar plahig yaouank en deiz-se  
« Na, deut-c'hwi ganin d'ar jardin,  
Da glask eur boked louzou fin :

Da glask eur boked louzou fin,  
A varjolen, a durkantin ;

A varjolen hag a lavand,  
A zere ouzoh, plahig koant. »

Ar plahig yaouank a lare,  
'N kichenn ar jardin p'arrue ;  
« Adieu, ma mamm, adieu, ma zad,  
Biken n'ho kwelo ma daoulagad !

Aotrou, prestet din ho kontellou,  
Da droha treid ma bokedou ;  
Da droha treid ma bokedou,  
A zo e hir euz a dreunchou<sup>16</sup>. »

An aotrou Trede, pa glevas,  
E zorn 'n e hodell a vountas  
E zorn 'n e hodell 'n-eus bountet,  
Teir hontell dezi 'n-eus tennet.

Unan troad du, unan troad gwenn,  
Eun all c'hwezset en aour melen ;  
En hini troad du eo kroget,  
'N-kreiz he halon 'deus-hi plantet !

Pa zistroas 'n aotrou en-dro,  
'Oa 'r plah yaouank war he geno' ;  
'Oa 'r plah yaouank 'n-kreiz ar jardin,  
He fenn 'n-tal pennou he daoulin.

\*

Ma lavare c'hoaz an den fall :  
« Pe nemed daoni ma ene,  
N' oas ket eet gwerh dirag Doue. »

#### IV

An aotrou Troude a lare  
Da oll dud e di en noz-se :  
« Arru ez e' gwall-bell an noz-se ?  
Poent da beb den mond da repoz ! »

Ar ouarnerez a lare  
D'an aotrou Trede en noz-se :  
« 'Liez am-boia ho kelennet,  
War benn ar gwin hag ar merhed,

Ispisial war-benn houmañ  
'Zo c'hoar-vager da Gerninañ :  
Nan eus servijer en ho ti,

---

<sup>16</sup> dreunchou : korzennou.

Na oar ho nozvez koulz ha c'hwi. »

« Mar karet n'am diskuillfet ket,  
Me 'roio dah peb a gant skoed ;  
Ni he lieno, 'archedo,  
'Zono dezi ar glaz tano ! »

V

'N-doa ket kanet ar hog d'an de',  
'Oa torret perzier 'n Trede torret,  
Ez oa perzier Trede torret,  
Gand Kernenañ hag e baotred.

'N aotrou Kernenañ 'lavare  
En maner Trede,p'arrue :  
« Demad ha joa oll en ti-ma',  
An aotrou Trede,peleh ema ? »

Ar palefrinier a laras  
D'an aotrou Kernenañ, p'hen klevas :  
« Eet eo en eun tammig afer,  
Ne deuio ket henoz d'ar gêr. »

« Gaou a larez, palefrinier.  
Emedi sur da vestr er gêr,  
Rag te 'zo kustum mond gantañ,  
War an hentchou da verheta ! »

'N aotrou Trede, 'vel ma klevas,  
Gand ar viñs dan traoñ a diskennas ;  
Gand ar viñs d'an traoñ e' tiskennet,  
Eur gwall salud braz e-neus bet.

« Aotrou Trede, din-me laret,  
D'am hoar-vager hoh-eus dezi greet. »  
« Emedi du-ze er jardin,  
He fenn 'n tal pennou he daoulin ! »

« Ma c'hoar-vager az-teus lazet,  
He revañch rankan da gaved ! »  
« Kernenañ, lez din ma buhe',  
Me a roy dit ma oll leve ! »

« N'eo ket madou a houlenan,  
Buhez 'vid buhez a rankan ;  
Ma hoar-vager az-teus lazet,  
He revañch 'rankan da gaved ! »

D'ar zul vraz neuze ez int eet,  
Da hoari ar hleze, ar fleured ;

Markiz Trede e-neus kollet  
Kernenañ e-neus hañ treuzet !

Kriz 'vije 'r galon na ouelje,  
'Barz en Trede neb a vije,  
'Weled ar zal-vraz o ruzia,  
Gand gwad ar markiz o skuilla !

'N aotrou Kernenañ a lare  
En maner Trede, d'ar pred-se :  
« Laket ho torn dindan e benn  
M' vo roet dezañ an absolvenn ! »

*Renaou, ar boutaouer-koad, en parrez Tregrom, 1854.*

# Markiz Tredre

## Doare all

*Notenn el leor orin, e galleg : C’hweh skrid am-eus dastumet, mez n’int ket disheñvel-braz ;  
Setu amañ an doare IV.*

### IV

Markiz Tredre a lavare  
D’ar plahig yaouank en noz-se :  
« Deoni bremañ da gousked,  
Pell om en noz, poent e’ moned. »

Ar plahig yaouank a respontas  
Da varkiz Trede, p’hen klevas :  
« Et-c’hwi da gousked pa garfet,  
Ma fedennou ‘m-eus da lared. »

Ar plahig yaouank a lare  
En maner Trede en noz-se :  
« Itron Varia ar Goz-Yeoded,  
Gret ma’z in fenez d’ho kweled ! »

Markiz Trede p’e-neus gwelet  
Ar plah da gousked ne ee ket eet,  
‘Mêz e wele zo dilampet,  
Da gomz o-daou int ‘n em laket.

Markiz Trede a lavare  
D’ar plahig yaouank en noz-se :  
« Deut-c’hwi ganin-me d’ar jardin,  
Da dibab ar boked louzou fin... »

« Markiz Trede, mar am haret,  
Eur gontell din-me a rofet,  
‘Vid krenna troadou ma boked,  
Am-eus re hir me dilammer. »

« Kontellou dahne roin ket,  
Eur pognar aour ‘po, mar karet, »  
Er pognar aour pa’z eo kroget,  
Euz ar Werhez ‘deus goulennet :

« Itron Varia ‘r Rozera,  
Pe me em laz, pe me ne ra ?  
‘Balamour dah, Gwerhez Vari,  
N’houleñnan ket hoh ofañsi. »

N’oa ket he ger peurlavaret,  
‘N-kreiz he halon ‘deus hañ plantet ;  
Pa zistro ar markiz en-dro,

‘Oa ar plahig ar he geno’ !

Markiz Trede a lavare  
D’ar plah yaouank eno neuze :  
« Pe nemed daoni am ene,  
N’oas ket eet gwerh dirag Doue ! »

Markiz Trede a lavare  
Na, d’e oll baotred en noz-se :  
« Ma faotred, et-c’hwi da gousked,  
Arru pell an noz, poent eo moned. »

Ar ouarnerez a laras  
Da varkiz Trede p’hen klvas :  
« Nan eus hini e-barz ho ti  
Na oar ho torfet koulz ha c’hwi.

‘Liez ‘m-eus bet ho kelennet  
War-benn ar gwin hag ar merhed,  
Ispisial war-benn houmañ,  
C’hoar-vager an aotrou Kernenañ ! »

## V

N’en-doa kanet ar hog d’an de’  
‘Oa torret ar perzier en Trede ;  
‘Oa ar perzier en Trede torret,  
Gand Kernenañ hag e baotred.

‘N aotrou Kernenañ a lare  
En maner Trede p’arrue :  
« Demad ha joa ‘barz an ti-ma’,  
Markiz Trede, peleh ema’ ?

Ar palefriner a laras  
D’an aotrou Kernenañ p’hen klevas :  
« Ma mestr-me n’ema ket er gêr,  
Na bet abaoe digwener. »

« Gaou a larez, palefrinier !  
Da vestr ‘zo er gêr, pa’z out ivez ;  
Te ‘zo kustum da vond gantañ  
War an hentchou, da verhetañ ! »

Markiz Trede, ‘vel ma klevas  
‘Traoñ gand ar viñs a ziskennas ;  
‘Traoñ gand ar viñs e’ diskennet,  
‘N aotrouKernenañ ‘n-eus saludet.

« Lez-te ganin-me ma buhe’,  
Me ‘roio dit ma oll leve,

Ma maner koz euz a Drede,  
Ha 'yey e servij ar roue. »

« N'e' ket da leve a glaskan,  
Rebech m' hoar-vager 'houleñnan,  
Rebech m' hoar-vager 'rankan kaved  
A zo bet 'barz ma zi maget ! »

« Ema du-ze 'barz ar jardin  
D'an treñchenn ar wezenn ivin  
Endan kev ar wezenn plantet,  
Mar ne gredez ket,kerz da weled t »

N'oa e her peurlavaret ,  
E gleze drezañ 'n-eus treuzet :  
Markiz Trede, me ho tesko  
Laerez merhed war an hentcho' !

Kriz 'vije ar galon na ouelje  
'N amner Trede, neb a vije,  
O weled ar pleñch o ruzia  
Gand gwad ar markiz o skuill !

*Bet kanet gand Mari-Job Kerival, e Ker  
arborn, e 1848.*



# Marivonig

An deiz kenta euz a viz Du  
'Tiskennas ar Zaozon en Dourdu. (*bis, beb eil gwerzenn*)

En Dourdu pa'z int diskennet,  
Eur plahig yaouank 'deus laeret.

O-deus laeret eur plahig koant  
Da gas gante d'o batimant.

Marivonig eo heh ano,  
Genidig e' a Blouganou.

Marivonig a lavare :  
'Biou porz he zad pa dremene :

« Adieu, ma mamm, adieu, ma zad,  
Biken n'ho kwel ma daoulagad !

Adieu, ma breur, adieu, ma hoar.  
Biken n'ho kewlan war an douar !

Adieu, kerent ha mignoned,  
Biken n'ho kwelan war ar bed ! »

Ar Varivonig a ouele,  
Ne gave den he honsolje ;

Ne gave den he honsolje ,  
Med an *Anglez-braz*, hennez a ree :

« Marivonig, na ouelet ket,  
'Vid ho puhez ne gollfet ket :

'Vid ho puhez ne gollfet ket,  
Med hoh enor ne laran ket ! »

« Gwell eo ganin-me ma enor  
'Vid kement lestr 'zo war ar mor.

Aotrou an Anglez, din laret,  
Nemed dah na vin oblijet ? »

« Din ma-unan, d'am faotr a gambr,  
D'am martoloded p'o-do c'hoant !

D'am martoloded p'o-do c'hoant.  
Bez' zo 'neze unan ha kant ! »

« Aotrou an Anglez, din laret  
War 'r pont da vale ma lezfet ? »

« War bont al lestr, ya, baleet,  
Med taolet evez 'veh beuzet.

Marivonig a lavare  
War bont al lestr pa bourmene :

« Gwerhez Vari, lavaret din,  
Pe me'n em veuz, pe me re rin ?

'Balamour dah, Gwerhez Vari,  
N'houlennan ket hoh ofañsi.

Ma'z an er mor, me 'vo beuzet,  
Ha mar choman, me 'vo lazet ! »

Euz ar Werhez he-deus sentet,  
War he fenn er mor en em daolet...

Eur pesk bihn a foñs ar mor,  
'Zav Marivon wae horre 'n dour.

An aotrou 'n Anglez a lare  
D'e verdidi<sup>17</sup> eno neuze :

« Merdedi, merdedi, hastet,  
Me a roio dah pemp-kant skoed !

An aotrou 'n Anglez a lare  
Da Varivonig en deiz-se :

« Marivonig, c'hwi 'zo manket,  
Ma karjeh 'vijeh ma fried ! »

*Bet kanet gand Janed Ar Gall, Kerborn, 1849.*

---

<sup>17</sup> D'e verdidi : D'e vartoloded.

*Doare all*  
*(e diwez ar ganaouenn)*

Eur pesk bihan a foñs ar mor  
'Zav Marivon war horre an dour

Eur barr-avel a zo savet.  
'N toull porz he zad 'n-eus he haset.

« Tadig paour, digoret ho tor,  
Marivonig a houll digor !

Ha posubl e ve, ma Doue,  
Marivonig a zo aze ! »

Teri zro d'an ti he-deveus greet,  
Ha neuze kerkent eo marvet !

# Yannig ar “bon garçon“

## I

Marhadourien Pariz, marhadourien Rouan ;  
Pa yefet da Gerhaez, da foar galan-goañv<sup>18</sup>,  
Na et ket d’an ti braz a Rohan da lojañ<sup>19</sup>.

Yannig ar Bon garçon nan eus ket sentet,  
D’an ti braz a Rohan da lojañ eo bet eet.

« Laret din-me, ostizez, ha me a ve lojet  
Hag eur marchosi kaer da lakaad ma roñsed ? »

« Diskennet, marhadour diskennet, deut en ti,  
Lakeet ho roñsed e-barz ar marchosi ;  
Ez a ma mevel braz evid o abreuvi.

Tostaet, marhadour, tostaet ‘tal an tan,  
Da gemer eur banne evid gortoz ho koan ;

Pesked deuz an dour dous ho-pezo da goania,  
Pa vo erru an ozah euz foar kalan goañv.

Matezig, Margodig, depechet-c’hwil buan  
D’enaoui ar goulou ha da hweza an tan,

D’enaoui ar goulou ha da hweza an tan,  
Mond d’ober e wele d’ar marhadour bihan. »

## II

P’antree ‘r marhadour, p’antree en e gambr,  
Eñ a hwitelle sklêr gand e bifer<sup>20</sup> arhant ;

Eñ a hwitelle sklêr gand e bifer<sup>21</sup> arhant,  
Hag a rejouise kalon ar plah yaouank.

Pa éz ee ar vatez Margodig ‘vid ober ar gwele,  
Yannig ar Bon-garçon ganti a vadine ;

Yannig ar Bon-garçon ganti a vadine,  
Ar vatez Margodig outañ ’huanade :

---

<sup>18</sup> kala-goañv : an Ollzent. (bet skrivet “goan“)

<sup>19</sup> Na et ket d’an ti braz a Rohan da lojañ : **notenn el leor orin** :  
Eur maradour bihan, euz ar gêr a Rouan ;  
‘Zo eet da Herhaez, da foar galan-goañv,

Da brena daou houpl saout, eur houpl ohen ivez,  
Evid gounid gante e-barz ar foar nevez.

<sup>20</sup> e bifer : pifer ; Galleg fifre“.

<sup>21</sup> e bifer : pifer ; Galleg fifre“.

« Matezig Margodig, na, din-me lavaret,  
Na, pa zellet ouzin, perag ‘huanadet ? »

« Aotrou ar marhadour, na, din-me lavaret,  
Ha c’hwil ‘peus promese gand plah yaouank ebed ? »

« Matezig Margodig, me n’ho traisin ket,  
Hirio a zo teir zizun a oa deiz ma eured. »

« Doue d’ho konsolo, ha c’hwil hag ho pried,  
Hag oh amañ er plas leh ma vefet lazet<sup>22</sup> !

Sellet ‘ndan ho kwele, ‘welfet eur hleze noaz,  
‘Baoe laza tri all nan eo ket gwalhet c’hoaz ;

Aze ‘o tri horv marv o hortoz ar mare,  
C’hwil, Yannig,,’r Bon-garçon,’vezo ar pevare. »

« Pa ve ma hinkane ha ma zibr alaouret,  
Ha m’ valizenn arhant, ha pa vent oll kollet,

Ha me er gêr a Rouan gand Mari, ma pried,  
Matezig Margodig, ne rafen kaz ebed.

Matezig Margodig, rekour din ma buhe’,  
Ar choaz euz ma breudeur, Margodig, az-to-te ;

Ar choaz euz ma breudeur, Margodig, az-po-te marhadourien ‘vel me<sup>23</sup> ...,  
Paotred an terrupla, marhadourien ‘vel me<sup>24</sup> ...,

Na, pa zone an eur, an eur a hanternoz,  
Ar vatez Margodig ne helle mui renoz :

« Na, marhadour bihan, sav-te a leh-se  
Ha mar az-teus c’hoant da rekour da vuhe’. »

Ha dre dor ar jardin ez int bet achapet,  
Breur-kaer an ostizez en-deus bet o hleved.

### III

Ha pa gane ar hog, ar hog da houlou de’,  
N’he-doa an ostizez a renoz ‘n he gwele :

« Matezig Margodig, savet, savet buan,

---

<sup>22</sup> ma vefet lazet : Doare all :

Yannig ar bon garçon, braoa den maz’ out-te,  
Ha war-benn ma vo deiz, te ‘gollo da vuhe’.

<sup>23</sup> ‘vel me : fazi : ‘veldon-me.

<sup>24</sup> ‘vel me : fazi : ‘veldon-me.

D'enaoui ar goulou ha da hweza an tan ;

D'enaoui ar goulou ha da hweza an tan,  
'Vid ma lazfom on-diou ar marhadour bihan ! »

Breur-kaer an ostizez dezi a lavare :  
« Ho matez Margodig, leal, n' 'ma ket aze,

Ho matez Margodig, leal, n' 'ma ket aze,  
Eet e' gand ar marhadour, war lost e hinkane ! »

« Leal, triweh marhadour em-eus-me lazet,  
Mar am-bije gouvezet, 'vije an naontegved ! »

#### IV

Neb a welje Margodig war baveziou Rouan,  
'N he zreid eur boutou lijer, hag eur bazou<sup>25</sup> atao gloan,  
Hag eureujet ganti, ar marhadour bihan !

*Doare all :*  
P'oa arru el lann vraz, o ! ya pell ahane,  
E taolas Margodig diwar e hinkane.

*Bet kanet gand Mari-Job Kado. Plouared 1845.*

---

<sup>25</sup> eur bazou : eul loerou.

# Silvestrig

Gwez kenta

## I

Me 'm-eus eur mab Silvestrig, ha ha n'am-eus nemetañ,  
Ha 'n-eus bet hardison da zond d'am glaharañ ;  
An hardiegez da vond a-raog e benn<sup>26</sup>;  
Eur zoudard en arme, dirag e gabiten  
Me 'm-eus bet ar vadelez da voned d'hen goulenn,  
Dirag kalz tud a-feson, digand e gabiten.  
Ar habiten, p'am gwelas, a chomas saouezet :  
« Ganeh-c'hwi, den añsien<sup>27</sup>, me a zo saouezet !  
Lemel digand ar roue, soñjoh e zoudarded ?  
Touchet e-neus paeamant, ambarkiñ a zo red. »  
« Lavaret din, kabiten, pegement eo koustet,  
Ha ma 'm-eus arhant 'walh e vezo rambourset. »  
« Hag ho-pe pemp kant skoed, n'ho-po ket anezañ,  
Rag n'eus soudard er vandenn a blij din eveltañ. »

## II

Pa oan-me er Roz Julou, em gwle, kousket mad,  
Me 'gleve merhed rRoudour kana son ma mab.  
  
Ha me trei ouz ar voger, hag o komañs gouela :  
Aotrou Doue, Silvestrig, peleh out-te brema' ?  
  
Marteze te 'zo maro pemp-kant leo diouzin,  
Taolet da eskernigou d'ar pesked da zebri !  
  
Taolet da eskernigou d zebri d'ar pesked.  
Ma vijent ganin bremañ, m'em-boa o briatet.  
  
Me 'm-eun eun evnig bihan du-mañ, en toull ma dor,  
« Barz e-kreiz daou vên, en eun toull a 'r voger ;  
  
« Barz e-kreiz etre daou vên, en eun toull a 'r voger ;  
Tromplet eo ma spered, mar n'ema ket en gor ;  
  
Mar deu d'an evn da zevel, da ober bloavez mad,  
Me a lako ma evnig d'vond da weled ma mab.  
  
« O ! ya, skrivet ho lizer, denig kêz, pa garfet,  
Me a zo prest d'hen dougen raktal en ho reked. »  
  
Pa oe skrivet al lizer, lakaet d'an evn en e veg,  
Etrezeg Metz-Sant-Lorañs gantañ 'z eo partiet...

---

<sup>26</sup> **da vond a-raog e benn** notenn : el leor orin : faire un coup dr tête.

<sup>27</sup> den añsien : den koz.

« Aretet-c’hwi, Silvestrig, lennet al lizer-ma’,  
A zo degaset dah-c’hwi gand ho tad ‘zo du-ma’. »

« Diskennet, evnig bihan, da vordi an *ablestr*<sup>28</sup>  
Ma skrivin dah eul lizer da gas d’am zad d’ar gêr ;

Ma skrivin dah al lizer evid lared dezañ  
‘Barz pemzeg deiz a hidu me ‘n em gavo gantañ.

### III

« Boñjour dah, evnig bihan, bremañ pa’z oh-c’hwi bet ;  
Hag-eñ ‘zo yah Silvestrig, mar hoh-eus hañ gwelet ? »

« Ya, yah ez eo Silvestrig, komzet em-eus gantañ,  
‘Barz pemzeg deiz a hidu, en em gavo amañ... »

Pa oa an tad glaharet oh ober e gañvou,  
Ez oa e vab Silvestrig ‘n toull an nor o selaou.

« Tavet, tavet, emezañ, tad a volntez vad.  
Na skuillet ken a zaelou, setu amañ ho mab ;

Na skuillet ken a zaelou, setu amañ ho mab,  
O tizrei euz an arme, ma fardonet, ma zad :

Dalit-c’hwi ma horn-butun ha ma diou bistolenn,  
Ar re-ze a roan dah evid ho pi,ijenn ;

Evid ma hallfet lared ho-po maget eur mab  
Evid ho klahar : ma fardonet, ma zad. »

*Dastumet e parroz Duod.*

---

<sup>28</sup> *ablestr* : **notenn el leor orin** : marteze *ma lestr*.



# Silvestrig

## Eil gwez

Eter chapel Sant Eflamm ha toseñ Menez-Bre,  
'Zo eur habiten yaouank o sevel eun arme ;

'Zo eur habiten yaouank o sevel eun arme,  
Me 'm-eus eur mab Silvestrig a lavar mond ive'.

Me 'm-eus eur mab Silvestrig ha n'am-eus nemetañ,  
N'eus soudard 'barz ar vandenn a garer eveltañ.

Me am-bo ar vadelez da vond d'hen goulenn  
Gand kalz a dud a-feson digand e gabiten.

Ma habiten, p'hen klevas, da zelaou 'zo chomet :  
« Gnaeoh, denig ansian, me 'zo saouezet !

Felloud dah trompla ar roue, ha kaoud e zoudarded ?  
Touchet e-neus an arhant, d'an arme 'rank moned ;

Pa rofeh din pemp-kant skoed, n'ho-po ket anezañ,  
Nag eur soudard er vandenn a blij eveltañ. »

« Adieu eta, Silvestrig, er giz ar mab prodig !  
Ma vije chomet er gêr, ni 'vije pinvidig !

Me 'm-eus eun evnig bihan en kichenn toull ma dor,  
En eun toullig ar voger, me 'gred emañ en gor.

Na, te, ma evnig bihan, te az-peus diou askell,  
A nijfe dreist ar mor braz, o ! ya, dreist ar mor pell ;

A nijfe evidon-me bete penn an arme,  
Da houzoud hag ema Silvestrig en buhe' ?

## II

« Demad dah-c'hwi, Silvestrig, demad dah a laran. »  
« Ha dit, ivez, evn bihan pa 'z out deut bet' emañ. »

« Me a zo degaset emañ gand ho tad dezolet,  
Hag a lavar, Silvestrig, ez eo c'hwi 'zo kirieg. »

« Diskennet, evnig bihan, diskennet war ho taoudroad,  
Ma skrivin dah al lizer da gas d'ar gêr d'am zad ;

Ma skrivin dah al lizer da gas d'ar gêr dezañ,  
'Barz daou vloaz a hirio e vin arru gantañ... »

« Pa oan-me 'barz ma gwele kousket mad,  
Me 'gleve merhed Roudour o kana son ma mab... »

Pa oa an tad dezolet oh ober e gañvou,  
E oa e vab Silvestrig 'n toull an nor o selaou.

« Na seset, tad dezolet, seset-c'hwi da ouela,  
Sellet ho mab Silvestrig a zo arru ama' »

*Plouared*<sup>29</sup>

---

<sup>29</sup> *Plouared* : **Notenn e galleg e-barz al leor orin** : Cette pièce correspond à celle du Barzaz Breiz *Le retour d'Angleterre*.

# An aotrou Rozmadeg

## Gwez kenta

### I

'Tre Rozmadeg hag ar baron  
'Tre Rozmadeg hag ar baron<sup>30</sup>  
'Zo savet eun tamm disañsion,  
'Abalamour d'eun alead gwez  
A zo daou-hanter en etreze.

An aotrou Rozmadeg a lare  
E rankje kaoud ar choaz a 'r gwez ;  
E rankje kaoud ar choaz a 'r gwez ;  
E heritourien en goude.

« Kent evid kaoud ar choaz 'r gwez,  
Te 'ranko gonid, aneze ! »  
'N aotrou Rozmadeg a lare  
D'an aotrou ar Baron en deiz-se :

« Eom, ni on-daou, d'ar Prad-Nevez,  
Evid c'hoari eun taol kleze. »  
« En c'hoari ar hleze, me n'in ket,  
D'an overenn me 'rank moned ; »

« Eom-ni on-daou d'an overenn,  
'Vid torri ar wall-blanedenn ;  
D'an overenn-bred, d'ar gousperou,  
A dorr kalz a blanedennou. »

« D'an overenn-bred ne yefom ket,  
D'hoari ar hleze e' red moned ;  
Eom ni on-daou d'ar Prad-Nevez,  
Evid c'hoari eun taol kleze !

### II

Er Prad-Nevez p'int arruet,  
Da hoari 'r hleze int bet eet ;  
P'int eet da hoari ar hleze,  
An aotrou ar Baron 'honeze.

An aotrou Rozmadeg 'lavare  
D'an aotrou 'r Baron, pa honeze :  
« Baron, dastumet ho pouklo<sup>31</sup> ,

---

<sup>30</sup> 'Tre Rozmadeg hag ar baron : Doare all :

Er bloaz seiz-kant pevarzeg,  
P'oa bet ar Stadou en Naoned :

« Eom ni oll d'an overenn,  
Ha goude-ze, ni 'gombato. »

<sup>31</sup> pouklo' galleg "boucliers"

Mar 'z an warneze m'o zorro ! »

D'astum e vouklo' 'oa pleget,  
An trubard e-neus hañ treuzet !  
'N aotrou 'r Baron a lavare  
D'e baj bihan eno neuze :

« Gwillaou 'r beleg, ma mevel mad,  
Klask eur beleg d'am hovesad  
Medesin da stanka ma gwad,  
M'am-bo buhez ar Rozmadeg. »

Gwillou 'r beelg a lavaras  
D'e vestr ar Baron, p'hen klevas :  
« Gwell 've ober ho testamant,  
Keid ma'oh en ho entantamant. »

Kenta testamant a eure,  
Oh ofr e ene da Zoue :  
« Gwillaou 'r Beleg, ma mignon kêz  
C'hwi 'h a d'ar gêr ha me n'h an ket :

Ma gourhemennou d'am fried,  
Med 'laret ket e vin lazet ;  
Med laret 'vin eet da Bariz  
Da zaludi ar roue Loiz.

Laret e vin eet da Bariz  
Da zaludi ar roue Loiz,  
Prenet ganin eur marh nevez,  
Kalonig ma marh 'oa re ge. »

### III

Ar Varonez a houlenne  
Euz Gwillaou 'r Beleg, en deiz-se ;  
« Gwillaou 'r Beled, din-me laret,  
Ho mestr 'r Baron peleh eo eet ? »

« Ma mestr a zo eet da Bariz  
'Vid saludi ar roue Loiz.  
Prenet gantañ eur marh nevez,  
Kalon e varh a oa re ge. »

Gwillaou 'r Beleg a lavare,  
Pa oa gand e goan, en noz-se :  
« Daoust piou 'n-defe ar hardison  
D'anoñs ar helou d'an itron ?

D'anoñs ar helou d'an tron,  
Eo lazet on mestr ar Baron ?

D'dapoud e vouklo' p'oa pleget,  
Rozmadeg trubard 'n-eus hañ treuzet ! »

Ar vatez vihan pa glevas,  
D'an neh gand ar viñs eo pignet,  
D'ar Varonez he-deus laret :

« Aotrou Doue, petra 'vo greet ?  
On mestr ar Baron 'zo lazet !  
D'dapoud e vouklo' p'eo pleget,  
Rozmadeg trubard 'n-eus hañ treuzet !

Ar Varonez, p'he-deus klevet,  
Teir gwez d'an daouar 'zo semplet,  
Teir gwez d'an daouar 'zo semplet,  
'R vatez vihan 'deus he gorreet.

'R Baron bihan, pa 'n-eus klevet,  
D'e vamm 'r Varonez 'n-eus laret :  
« Ma mammig paour, na ouelet ket,  
Me am-bo buhez 'r Rozmadeg ! »

#### IV

Ha pa oa pemzeg vloaz oajet,  
D'e vamm 'r Varonez 'n-eus laret :  
« Ma mamm 'r Varonez, m'am haret,  
Kleze ma zad din a rofet ;

Kleze ma zad din a rofet  
Da vond da gaoud ar Rozmadeg ;  
Da vond da gaoud ar Rozmadeg,  
E vuhez 'rankan da gaved ! »

Ar Baron yaouank a lare  
'N ti ar Rozmadeg p'arrue :  
« Demad ha joa oll en ti-ma',  
Ar Rozmadeg, peleh ema' ? »

Ar ouarnerez a laras  
D'ar Baron bihan p'he klevas :  
« Ema du-ze e-barz e gambr,  
Et-c'hwi d'hen kaoud, mar hoh-eus c'hoant. »

« D'hen kaoud en e gambr nan in ket,  
Eñ 'deuy d'an traoñ pa vo pedet. »  
Ar Rozmadeg, 'vel ma klevas  
E benn en eur en prenestr a vountas ;

E benn er prenestr 'n-eus bountet,

D'ar Baron yaouank 'n-eus laret :  
« Baron bihan, kerz a leh-se,  
Rag euz da wad am-eus true' ! »

« N'ho-po nep truez euz ma gwad,  
Pa n'ho-poa euz hini ma zad :  
Ha hastet buan dond d'an traoñ,  
Pe me 'hwezo 'n tan ho ti ;  
Ho talho en-kreiz da devi. »

'N aotrou Rozmadeg a lare  
D'oll dud e di, pa gimiade :  
« Me 'h a bremañ d'ar Prad-Nevez ;  
Me 'zo sur ma kollin ma buhez ! »

Pa int eet da hoari ar hleze,  
'R Baron bihan a honee.  
'N aotrou Rozmadeg  
An aotrou Rozmadeg a lare  
D'ar Baron bihan pa honee :

« Baron, dastum-te da vouklo',  
Mar an warnezo m'ho zorro. »  
« Hag e ve torret ma bouklo',  
Arhant 'walh 'zo emgodello' ;

Arhant 'walh 'zo emgodello'  
Da gaoud re all ho ramplaso ;  
N'az-pe ket neh gand kement-se,  
C'hoari hardiz da daol kleze ! »

'N aotrou Rozmadeg a lare,  
D'an aotrou Baron, p'honee :  
« Baron, dastum da vouchouerou,  
Mar an warneze m'o saotro. »

« Pa ve saotret m' mouchouero',  
Arhant 'walh 'zo em godello' ;  
Arhant 'walh 'zo em godello' ;  
Merhed 'zo 'r vro hag o gwalho ;

N'az-pe ket neh gand kement-se,  
C'hoari hardiz da daol kleze :  
C'hoari da daol kleze pa gari,  
'Out amañ en eur ma varvi ! »

N'oa ket e her peurlavaret,  
E benn diwar e gorv 'n-eus trohet,  
Ha taolet 'nezañ war ar ru,  
D'ar vugale d'hoari dotu.

Hag an dudjantil a lare  
An eil d'egile aneze :  
« Sed ar Baron bihan 'vond amañ,  
Ha penn ar Rozmadeg gantañ ! »

Ma lare an eil d'egile :  
« Hennez 'oar c'hoari ar helze ! »

V

E vamm 'r Varonez 'houlenne  
Euz 'r Baron bihan, p'arrue :  
« Ma mab ar Baron, din laret,  
Bet oh euz buhez Rozmadeg ? »

Ar Baron bihan a laras  
D'e vamm 'Varonez, p'he hlevas :  
« Ma mamm, emañ e benn war ar ru  
Gand 'r vugale 'o choari *dotu*. »

**Doare all :**

Gand 'r vugale 'o choari *dotu*  
« Me 'm-eus laket e benn war 'r pave'  
D'servijoud d'voul hillou deze ! »

**Benaou**, ar boutaouer-koad, en parroz Tregrom. 1854.

# Ar Rozmadeg

## Eil gwez

### I

Baron Huet a lavare  
Da Rozmadeg, eun deiz a oe :  
« Eom-ni on-daou d'an overenn,  
'Vid torri ar wall blanedenn. »

'N aotrou Rozmadeg a lare  
Da varon Huet en deiz-se :  
« Et d'an overn neb a garo,  
Eom-ni da hoari 'r hlezeio' !

Eom-ni da hoari 'r hlezeio',  
An neb a gollo a gollo :  
An neb a gollo a gollo,  
Neb a honezo a honezo !... »

Na, teir eur hanter ez int bet  
C'hoari ar hleze, ar fleuret ;  
'Benn ma oa peder eur sonet,  
Baron Huet a oa lazet.

Baron Huet a lavare  
Da Willaou 'r Beleg en deiz-se :  
« Et-c'hwi d'ar gêr, Gwillaou 'r Beleg,  
Ha kaset gneoh ma roñsed :

Ha laret 'vin eet da Bariz,  
'Vid saludi ar roue Loiz,  
Prenet ganin eun hinkane,  
Kalonig, ma marh 'oa re ge. »

### II

Ar Varonez a lavare  
Euz prenestr he hambr en deiz-se :  
« Petra nevez 'zo en ti-mañ,  
Ma kren ma hastell er giz-mañ ?

Petra 'zo en ti a newenezio'  
Ma kren ma hastell kreh-ha-traoñ ? »  
Eur vatez vihan 'oa en ti  
Pell amzer 'zo o serviji.

Hag e lavaras d'he mestrez :  
« Eun dra bennag 'zo a-nevez,  
Me 'wel o tond Gwillaou 'r beleg.  
Ma mestr ar Baron n'welan ket. »



Ar Varonez, 'vel ma klevas,  
Gand ar viñs d'an traoñ 'ziskennas ;  
Gand ar viñs d'an traoñ eo diskennet,  
Da Willaou 'r beleg 'deus laret ;

« Gwillaou 'r Beleg, din-me laret :  
« Ho mestr 'r Baron, peleh eo eet ? »  
Gwillaou 'r Beleg a lavaras  
D'ar Varonez, 'vel m'e glevas :

Ma mestr a zo eet da Bariz,  
Da saludi ar roue Loiz,  
Prenet gantañ eun hinkane ;  
Kalonig e varh 'oa re ge. »

Ar Varonez a lavare  
Da Wullaou 'r Beleg, p'hen kleve :  
« Gwillaou 'r Beleg, mar am haret,  
Ar wirionez din a larfet.

Laret-c'hwi din ar wirionez,  
Me 'breno dah 'n habit nevez ;  
Eun habit nevez gand pasamant<sup>32</sup>,  
A vo brao da eun den yaouank. »

Gwillaou 'r Beleg a lavaras  
D'ar Varonez, 'vel m'he hlevas :  
Bronn Varia an Drinded,  
Nah ouzoh na hallan ket :

Nah ouzoh ne hallan ket :  
Ma Mestr ar Baron 'zo lazet ;  
Ma Mestr ar Baron 'zo lazet,  
Na, gand an trubard Rozmadeg !

Ar Varolez, 'vel ma klevas,  
Teir gwez d'an douar a gouezas,  
Teir gwez d'an douar eo kouezet,  
'R Baron yaouank 'n-eus he savet.

« Tavet, ma mamm,na ouelet ket,  
Revañj ma zad n'vo ket kollet ;  
Mar choman-me da dond en oad,,  
Me 'mo revañj maro maro ma zad !

### III

Ar Baron yaouank a lare

---

<sup>32</sup> pasamant : galleg : passements.

Da Willaou 'r Beleg, eun deiz a oe :  
« Tennet ma hezeg a 'r marchosi,  
Laket warne tapisiri ;

Laket warne tapisiri,  
Moned hedale a fell din,  
Moned hedale a fell din,  
Da weled Rozmadeg d'e di. »

Ar Baron yaouank a lare  
En maner *Derrien* pa arrue :  
« Demad ha joa oll an ti-ma',  
Ar Rozmadeg peleh ema' ?

Rozmadeg evel ma klevas,  
E benn er prenestr a vountas ;  
E benn er prenestr e-neus bountet,  
D'ar Baron yaouank 'n-eus laret :

« Et-c'hwi d'ar gêr, ma Baron mad,  
Ken a vefet arru en oad,  
Rag trouz braz 've, a gavan,  
Ho lemel a vuhez bremañ ! »

Ar Baron youank a laras  
Da Rozmadeg, 'vel ma klevas :  
« Deom da hoari ar hlezeio'  
Pe me lakay 'n tan 'n es<sup>33</sup> oll vado.,

A weli 'neze o leski,  
Ha te 'vo devet koulz hag i !

\*

Ar Rozmadeg, pa 'n-eus klevet,  
Gand ar viñs d'an traoñ 'zo diskennet ;  
Gand ar viñs d'an traoñ eo diskennet  
Da hoari 'r hleze int bet eet.

Diou eur hag hanter ez int bet  
O c'hoari 'r hleze, ar fleuret  
O c'hoari 'r hleze, ar fleuret  
.Rozmadeg a zo bet lazet.

#### IV

Pa'z ee ar Baron gand ar ru,  
E krene an dud en daou du ;  
'Krene an dud en daou goste' :  
« Hemañ 'oar c'hoari ar hleze ! »

---

<sup>33</sup> es : en da oll vadou.

Ar Baron yaouank a lare  
Er gêr d'e vamm, pa arrue :  
« Dalet, ma mamm, kleze ma zad,  
Me 'm-eus hañ gwalhet en e wad !

Me 'm-esu laket e benn d'an traoñ,  
D'ar vugale d'hoari hillou !  
Laret 'm-oa dah, asuezr mad,  
'M-bije revañch maro ma zad ! »

Bet kanet gand **Garandel**, lesanvet "kompagnon dall". Kerar born. 1847.

# Pontplañkoad

## Gwez kenta

### I

« Marharidig, ma merhig koant,  
Komz ho timezi am-eus c'hoant,  
Ho timezi da Bontplañkoad,  
A gavan zo eun intañv mad. »

« M'am dimezet da Bontplañkoad,  
Adieu d'an dañs ha d'an ebat ;  
Adieu d'an ebat ha d'an dañs ;  
Adieu d'an oll rejouisañs ! »

### II

Tri miz hanter e' bet padet  
Ar solanite<sup>34</sup> a 'n eured,  
Solanite ar ar bal, an dañs,  
Vizito<sup>35</sup> bemdez d'an noblañs...

Degouezet zo lizer d'an aotrou,  
Da vond da Roazon, d'ar Stadou ;  
Da vond da Roazon, d'ar Stadou,  
Dilezel oll, gwreg ha madou.

### III

An aotrou Pontplañkoad 'lavare,  
D'e baj bihan, eun noz a oe :  
« Eun huñvre 'm-eus bet en noz-mañ  
Am laka en neh, a gredan. ;

Ema an Itron war wenklo<sup>36</sup>  
Tri devez ha teir nozvez 'zo ! »  
Ar paj bihan a lavaras  
Da Bontplañkoad 'vel m'hen klevas :

« Ma mestrig mad, kouskom on-daou,  
Ha n'gredom ket en huñvreou ;  
Na gredom ket en huñvreou.  
An huñvreou a zo oll gaou ! »

An aotrou Pontplañkoad 'lavare,  
D'e baj bihan en noz-se :  
« Laket ar harr a-raog ar hoch,  
Me 'rank mond d'Bontplañkoad fenz. »

---

<sup>34</sup> solanite : galleg "solennité"

<sup>35</sup> Vizito' : galleg : mond da weled.

<sup>36</sup> war welo : war welioudi.

#### IV

An aotrou Pontplañkoad a lavare,  
En Pontplañkoad pa arrue :  
« Demad ha joa oll en ti-mañ,  
Petra neventiz 'zo amañ ? »

Ar vatez vihan respontas,  
D'an aotrou Pontplañkoad p'hen klevas :  
« Na, neventiz a-walh a zo,  
Ema an Itron war wenklo. »

Ema ar Varonez war wenklo,  
Tri devez ha teir nozvez 'zo. »  
An aotrou Pontplañkoad a lare  
D'ar Varonez, p'he salude :

« Ma fried paour, 'n em gourajet,  
Arru e' an noblañs d'ho kweled ;  
Arru eo an impalaer  
Ha merh ar roue da gomer<sup>37</sup> ! »

Nan eus nag aotrou nag itron  
'Lakafe joauz ma halon.  
Mar n'her gret-c'hwi, aotrou 'r Baron,  
Pe c'hoaz ma breur, eskob Leon.

Aotrou 'r Baron, ma veh kontant,  
Me 'rafe bremañ ma zestamant ? »  
« Gret an testamant a garfet,  
Arhant 'zo, beza 'vo paeet. »

« Ma habit eured, ar gwella,  
'Roan d'itron Santez Anna :  
Ma habit satin gwenn da Zantez Katell,  
Ma varvin tri deiz goude genel. »

N'oa ket he ger peurlavaret,  
'R Werhez en ti 'zo antreet ;  
Eo antreet 'r Werhez en ti,  
Evid gweled he digori.

« Aret<sup>38</sup> ! aret ! chirurgian ;  
Eun tammig out-te re vuan ;  
Laka 'l loa arhant 'n he geno',  
Ha flañch dezi he hostez deho' !

Ha flañch dezi he hostez deho',

---

<sup>37</sup> da gomer : da vaeron.

<sup>38</sup> Aret : galleg : Paouez.

Gwell eo koll unan 'vid koll daou ! »  
Ar chirurgian a lare  
D'an aotrou ar Baron, neuze :

« Setu 'r mabig bihan amañ  
'Zo leiz ma diouvreh anezañ :  
'Zo leiz ma diouvreh anezañ,  
'Med badeziant na vank dezañ.

« Me 'garfe ma mab badezet,  
Hag en douar triweh gourhed ;  
Hag en douar triweh gourhed .  
E vamm o vale war war ar bed<sup>39</sup> !...

« Me 'm-eus tri mab en Pontplañkoad,  
Melen o bleo, glaz o lagad,  
Hag 'hell gand gwirionez lared  
Biskoaz mamm n'he-deus o ganet ;

Biskoaz mamm n'he-deus o ganet.  
Dre o hostez int bet tennet.  
Teir Marharid am-eus bet,  
Hga o-zeir ez int marvet :

Teir gwreg Marharid am-eus bet,  
Siwaz ! o-zeir am-eus kollet ;  
Marharid Rhan, an diweza,  
'Laka ma halon da ranna ! »

*(Bet kanet gand Mari-Job Kerival. Kerarborn. 1849.*

---

<sup>39</sup> E vamm o vale war war ar bed : e vamm yah.

# Pontplañkoad

## Eil gwez

### I

« Marharidig, ma merhig koant,  
Komz ho timezin am-eus c'hoant.  
Ho timezi da Bonplañkoad,  
A galan<sup>40</sup> 'zo eun intañv mad. »

« Rezon, ma mamm e' ho kleved,  
Oboisa dah 'zo dleet ;  
Med da Bonplañkoad mar dimezan,  
Adieu da joaio' ar bed-mañ !

Peder fried Marharid 'deus bet<sup>41</sup>,  
O feder int bet digoret ;  
O feder int bet digoret,  
Siwaz ! ha me a vo ar bempved. »

### II

Dimezet int hag eureujet,  
Ha tri miz hanter e' padet,  
Ha tri miz hanter e' padet  
Ar solanite a 'n eured.

Pa 'z ee Ponplañkoad d'ar Stadou,  
Eñ a reseve lizerou ;  
Eñ a reseve lizerou  
Ez oa an itron war wenklo.

« Ez oa an itron war wenklo,  
Santez Marharid d'he delivro ! ;  
O klask genel eur mab bihan,  
Mil aon am-eus biken n'he gan ! »

He mab bihan a lavare  
Da Bonplañkoad, eun deiz a oe :  
« Glao puill a ra,du eo an noz,  
Ma mestrige, eom da repoz. »

« Fenez em gwele ne gouskan,  
Nag en neb leh ne repozan ;  
Nag en neb leh ne repozan,  
N'am-mo gwelet neb a garan.

Hag e vougfe eur marh bep kammed,  
Me a rank gwelet ma fried ;

---

<sup>40</sup> A galan : marteze bet moulet fall. "d'am zoñj".

<sup>41</sup> Peder fried Marharid 'deus bet : iskiz !

Me a rank gwelet ma fried.  
Eun dra 'zo ' nehi ma spered. »

### III

Ha Ponplañkoad a lavare  
En-tal e borz pa arrue :  
« Petra 'zo nevez 'barz ma zi,  
Ne zeu den da zigori din ? »

Ar ouarnerez a lare  
Da Bonplañkoad eno neuze :  
« Neventiz 'walh a zo er vro,  
Hag e parroziou tro-war-dro ;

Neventiz 'walh a zo er vro,  
Ema 'r Varonez war wenklo !  
Ema 'r Varonez war wenklo,  
Santez Marharid d'he delivro ! »

Tri deiz ha teur nozvez a zo  
Abaoe 'medi war wenklo,  
O klask genel eur mab bihan.  
Mil aon am-eus biken n'he gan ! »

« Demad, emezi, ma fried,  
Pell zo braz n'am-boa ho kwelet ;  
Aba m'oh eet euz an ti-mañ,  
Me am-eus bet gwall-galz a boan !

« Ma friedig, mar am haret,  
Petra 'n-eus laret sant Erwan<sup>42</sup> ? »  
« Sant Erwan e-neus laret din  
E vije red he digori ;

Laket eur vill<sup>43</sup> arhant en he geno'  
Hag an aotenn en he hostez deho' ;  
'Kavfet ar mabig, hag eñ beo. »

« N'lakay den kontant ma spered,  
Pa ne ret-c'hwi ket, ma fried ;  
N'lakay den kontant ma halon,  
Nemed ma breur, eskob Leon.

Ma fried, skrivet eul lizer  
Da eskob Leon dond d'ar gêr ;  
Laket warnezañ war eun dro,  
Degas medisin war ma zro ;

---

<sup>42</sup> Erwan : **Notenn, e galleg, el leor orin** : D'autres versions portent Sant Diboan, le saint qui guérit de tous les maux. C'est, m'a-t-on dit, saint Alibon qui a une chapelle à Plévin.

<sup>43</sup> eur vill : eur ganetenn.



Degas medisin war ma zro ;  
Gwell 've koll unan 'vid koll daou ;  
Gwell 've koll unan badezet  
Evid eun all ha ne ve ket !

Ma fried paour, mar am haret,  
Ganin d'ar bratell e teufet,  
Ganin d'ar bratell e teufet,  
'Vid ma zestamant 'vezo greet.

'Barz ar bratell pa 'ze o degouezet,  
Eur boked dezañ 'deus roet.  
Eur boked greet a dri seurt plant,  
Chargrin<sup>44</sup>, melkoni ha tourmant.

« Ma friedig, mar dimezet,  
Dimezelled n'gemeret ket,  
Kemeret merh eun ozah mad,  
A vo kustum da dravellad<sup>45</sup>.

Gwella buoh-lêz a zo em zi,  
D'am matez vihan roet hi ;  
Roet hi d'am matez vihan,  
'Deus bet ganin-me kalz a boan ;

D'ar zervijerien all peb a lous-aour,  
M'o-do soñj ar Varonez paour !

\*

« Kourajet, kourajet, m' fried.  
Arru an noblañs d'ho kweled ;  
Arru ma breur, 'n impalaer,  
Ha merh ar roue da gemer ! »

« Digoret frank an norojou,  
Ma welin o tond ma Ankou ;  
Digoret frank dor ar gegin,  
Ma welin 'tond ar medisin !

Eun habit gwenn euz ar re gaerra  
A brofan da zantez Anna,  
Hag eun all da zantez Katell,  
Ma vevin tri deiz goude genel. »

V

Pa oant o vond d'e zigori,

---

<sup>44</sup> Chargrin : ger galleg.

<sup>45</sup> da dravellad : da labourad.

Antreas diou werhez en ti,  
Diou werhez euz ar re gaerra :  
Ar Werhez ha santez Anna.

Antreas diou werhez en ti,  
A glennas e zigori :  
« Laket 'r vill arhant 'n geno'  
An aotenn 'n he hostez deho' ;

An aotenn 'n he hostez deho',  
'Kavfet eur mabig hag eñ beo ;  
Gret tri hraf nadoz 'n he hoste',  
Ganim e teuy a-benn tri de' !

## VI

« Baron, savet euz ho kwele ;  
Eur mab dah ken kaer hag an de' ;  
Eur mab dah ken kaer hag an de'.  
Ho pried yah war he gwele !

« Ma garfe ma mab badezet,  
Indan an douar tregont gourhed ;  
Indan an douar tregont gourhed,  
Ar vamm hen dougas o kerzed !

Me 'm-eus pevar mab en arme,  
A hell lared en gwirione',  
A hell en gwirione' lared  
Biskoaz gand mamm n'int bet ganet.

*(Bet kanet gand Anna Salin, Plouared) 1865)*

# Renea ar Glaz

## Gwez kenta

### I

Renea Ar Glaz a lavare  
'N he c'hoaze, 'tal ar Chapel Neve' :  
« Ma vijen-me leh ma karjen  
Nan eo ket amañ e vijen ;

Med e Kerversault, gand 'r mab henañ,  
Ma muia-karet er bed-mañ ;  
Ma muia-karet goude Doue,  
Hag 'vezo keit 'vin e buhe'. »

### II

Renea 'r Glaz a lavare,  
E-barz ar gêr pa arrue :  
« Petra 'zo nevez en ti-mañ  
Ma 'medi ar ber diouh an tan ?

Ma 'medi ar ber diouh an tan,  
'R pod-houarn braz, an daou vihan ? »  
« Terrupl, Renea, ho klevet,  
P'eo warhoaz kenta hoh eured ? »

« Mar 'medi warhoaz ma eured,  
Piou 'larer an hini 'm-eus bet ? »  
« Terrupl, Renea, ho klevet,  
Ha braoa den hoh-eus-c'hwi bet !

Ha braoa den hoh-eus-c'hwi bet ,  
Erwanig Gelard da bried ! »  
Renea Ar Glaz a lavare  
D'he matez vihan, an deiz-se :

« Dalet, matez, al lizer-mañ ;  
It-c'hwi da Gerversault gantañ ;  
It-c'hwi da Gerversault gantañ,  
Hag hen roet d'ar mab henañ. »

Ar vatez vihan a lare,  
En Kerversault,pa arrue :  
« Demad ha joa oll en ti-mañ,  
Peleh emañ ar mab-henañ ? »

« D'betra eh-eus ezomm 'r mab-henañ,  
P'eo dimezet he dous Renea ? »  
« Bet droug gand an neb a garo,  
Euz ar mab-henañ me gomzo ! »

« 'Ma du-ze wae wele, klañ',  
Gand ar heun d'he duus Reneañ. »  
Ar vatez vihan 'lavare,  
'Tal ar mab-henañ p'arrue :

« Dalet, mab-henañ, 'l lizer-ma'.  
Digand ho tousig Renea ;  
Digand ho tousig Renea,  
Henez e lizer diweza. »

N'oa ket 'l lizer digoret mad,  
Ma oa an dour 'n he daoulagad ;  
« Mar de' gwir lar al lizer-ma',  
Me n'eus ket pell meur da veva. »

Me n'eus ket pell meur da veva ;  
He-deus nebeutoh, a gredan ! »

### III

Renea Ar Glaz a lavare  
Euz prenestr he hambr, en deiz-se :

« Me 'wel Erwan Gelard 'tond amañ,  
Eur gompagnunez vrao 'zo gantañ ;  
Digand ma Jezuz reketan  
Ma torro e houg 'tond amañ ! »

Erwanig Gelard a lare,  
'N ti ar Glaz koz pa arrue :  
« Demad ha joa oll en ti-ma',  
'Medi ma dousig Renea ? »

« 'Medi 'r gabinet, 'n traoñ an ti,  
Erwanig, et-c'hwi daveti :  
Erwanig, et-c'hwi daveti,  
Ha 'n ano Doue, konsolet hi. »

« Demad deoh-c'hwi, Renea goant ; »  
« Ha dah, 'mezi, intañ<sup>46</sup> yaouank. »  
« Itron Varia an Drinded !  
'Vid eun intaon ma hemeret ? »

« 'Vid eun intañ n'ho kemeran ket,  
Med n'vo ket pell meur e vefet ! »  
Renea Ar Glaz a lavare  
En porz he zad hag en deiz-se :

---

<sup>46</sup> intaon : intañv.

« Me 'ro m' malloz a galon-vad,  
Ha koulz d'am mamm evel d'am zad,  
Ha da gement 'vag bugale,  
Hag o dimez 'n despet deze ;

Da gement a vag tud yaouank,  
Pa n'o lezont da choaz o c'hoant ! »  
Renea 'R Glaz a lavare,  
'Biou Kerversault pa dremene...

« Erwanig Gelard, laret din,  
Ma lezel 'rafet d'vond en ti,  
Ma lezel d'vond er maner-mañ,  
D' gimiadi euz ar mab-henañ ? »

« Evid bremañ na yefet ket,  
O tond d'ar gêr, ne laran ket. »  
« Bet droug gand an neb a garo,  
En Kerversault me 'diskenno ! »

Pa diskenn Rena en ti,  
'Oar rannet he halon dezi ;  
'Oar ar horv paour war ar varvskaon,  
Doue d'bardonno an anaon !

Tapoud e benn war he barlenn,  
Mervel eno en e gichenn !  
Kerhad zo liñsel d'o liena,  
Alumet goulou d'o veilla.

Oll dud an ti o-deus laret  
O lakaad o-daou 'n eur poullad,  
Ha lakaad o-daou 'n memez be',  
Pa n'int bet er memez gwele !

*Bet kanet gand ma mamm, Rosali Le Gac, Kerarborn, 1843)*

# Renea Ar Glaz

## Eil gwez

### I

Renea 'r Glaz a houlenne  
Euz he mamm, eul lun ar beure :  
« Petra 'zo nevez en ti-mañ  
Ma 'medi ar ber oh an tan ?

Ma 'medi ar ber oh an tan,  
Ar pod-houarn braz, 'n hini bihan ? »  
« 'N dra vraz, ma merh, eo ho kleved,  
Hag 'ma warhoaz deiz hoh eured ? »

« Penaoz warhoaz deiz ma eured,  
Ha n'on ket bet dimezet ! »  
« Pa oah 'n ho kwele, kousket mad,  
C'hwi 'oa dimezet gand ho tad. »

« Mar 'ma warhoaz deiz ma eured,  
Me 'h a d'am gwele da gousked,  
'Vid sevel warhoaz beure mad,  
Ma mamm, da wiska ma dillad ;

Mamm, evid 'n em brepari  
Mond gand Erwan Gelard d'eureuji. »  
Renea Ar Glaz a lavare  
D'he matez vihan en deiz-se :

« Matez vihan, mar am haret,  
Eul lizer 'vidon a gasfet ;  
Eul lizer 'vidon a gasfet  
Da Gerversault, d'am dous Kloareg. »

### II

Ar vatez vihan a lare  
En Kerversault pa arrue :  
« Demad ha joa oll en ti-mañ.  
Ar Hloareg yaouank, peleh 'mañ ?

« Emedi war e wele klañ',  
Gand keun d'e dous koant Renean ;  
Gand keun d'e dous koant Renean,  
Matez vihan, konsolet hañ. »

« Dalet, kloareg, al lizer-ma',  
Digand ho tous koant Renea. »  
Ar Hloaregig a lavare,  
E-barz al lizer pa lenne :

« Hervez 'lavar al lizer-ma',  
N'he-deus ket tri deiz da veva ;  
Hi n'he-deus ket tri deiz da vevañ,  
Me n'em-eus teir eur, a gredan !

Dalet, matezig, 'r pez daou skoed,  
'Vid ar boan hoh-eus kemeret. »

### III

Renea 'r Glaz a lavare,  
A brnestr he hambr, an deiz-se :

« Me 'wel arru 'r gopagnunez,  
Emaint 'tremen koad an *Dizes* ;  
Erwan Gelard er penn kentañ,  
Ha ma malloz roan dezañ ;

Ma malloz a roan dezañ,  
Pa deuas da glask plah ar vro-mañ ;  
Merhed a-walh 'oa en e gontre,  
Hep kaoud re all 'n despet deze ! »

*(Mankoud a ra ar peurrest el leor orin. Kollet eo bet ar pajennou)*

# Ma bro

*Da Gab Liskildry*

« Breizad eh on ‘vel ma zado’  
Evel-se ‘fell din-me.  
Karoud ma feiz, ma yez, ma bro,  
Savetei ma ene ! »

« Me ‘gar ma Breiz hag he hoajou  
Sioul ha dudiuz.  
He lanneier, he feunteuniou  
A hirvoud truezuz ! »

« Me ‘gar ma Breiz hag he rehell  
Krinet ha touskanet,  
Seblantoud a reont mervel,  
Lazet gand ar hleñved. »

« Lar din, ma Breiz, ‘n anoDoue,  
Lar din hep kavoud mez,  
Mar n’eo ket hennez da doare  
Koulz hag hini da yez ? »

« O ! nann, ma Breiz, ma bro garet,  
Ne hellez ket mervel,  
Keit ha ma chomo ar loued  
War da rehell uhel ! »

« Keit ha ma teuio ar mor don  
Da grignad da rehell,  
Houmañ ‘vezo bepred ma zon :  
Te ‘vevo, Breiz-Izel ! »

« Nann, ne varvi ket, ma mamm-vro,  
Pe ‘teus mibien feal.  
A lamp o halon ‘n o hreizo’,  
O ! ma bro Breiz-Izel ! »

**Kalon Dir.**



## Stign da delenn

D'am mignon hag amezeg Kalon-Dir evid e zonig  
kentañ "Ma Bro" kinniget din.

Eur steredennig a welan  
'Paouez sevel.  
Ha stumm ganti c'hoantaad lintrañ  
War Breiz-Izel.

Eun tamm muioh a sklêrijenn  
Dre ar mêzio',  
Da verraad an deñvalijenn  
War ar Vro !

Eur mab a gresk evid divenn  
Enor e Vamm ;  
War dal Arvor eur berlezenn  
A-nevez flamm !...

Da daolig-êsa, Kalon-Dir,  
A zo mad-tre ;  
Losk warni hag e ri, en gwir,  
Treo<sup>47</sup> a-zoare.

Pa vouskan ken brao an evnig,  
C'hoaz en e neiz<sup>48</sup>,  
Na dudiuiz 'vo e zonig  
Pa nijo 'mêz !

Mar zo bannou en heol veure  
O tispakañ,  
Tarzañ, broudañ, rei 'n e greisteiz<sup>49</sup>,  
Lein an oabl splann.

Gand an dir a zo ez kalon  
Gra eur hleñve,  
Da vrezelleta, ma mignon,  
'Vid ar Gwir-Fe !

Eur hleñve a daolo luhed  
'Vel eun taran,  
Hag a skarzo an hailloned  
'Glask on flastrañ.

Pa zo ijin ha nerz-spered,

---

<sup>47</sup> Treo : Traou.

<sup>48</sup> neiz : bet skrivet "nez" er skrid orin, evid rima gand "mêz".

<sup>49</sup> greisteiz : bet skrivet "greistez" er skrid orin, evid rima gand "veure".

Eur barz 'n ez kreiz,  
Kas prim da *Groaz ar Vretoned*  
Soniou e-leiz.

Soniou hag a raio tridal,  
'N o bezio' kloz,  
O soñjal en amzer gwechall  
On zado' koz.

Sonio' hag a yelo dre oll  
War an avel,  
Hag a skedo evel eun heol  
Dre Vreiz-Izel.

Stign da delenn evid kanañ  
A beb eil tro,  
War an toniou ar haerrañ,  
Doue... ArVro !!

**Gab Liskildri.**

## An dasprener

*Ton Kelven, pe :Va halon a zo fraillet.*

Beteg peur, o ! va Doue, e vo gwelet Bro-Hall  
Breset gand enebourien, pistiget gand tud fall !  
Peleh ema ar sturier 'hellfe dre e furnez  
Mired outi da skei ouz kerreg didruez ?

Eun den, eun den a glaskom ha ne gavom netra  
Nemed bugale dister war o zreid o krena,  
En o dorn eur stoloker pa vefe red eur hleze  
Greet gand dir, greet gand houarn ha dremmet a-zoare.

Penaoz eta e stourmim ouz ar ganfarded ruz  
A zo e kêr, er mêziou o labourad founnuz,  
O teurel krañch ha bilim ouz kement a zo mad  
Hag o vernia ar heuneud 'vid ober eun tantad.

An tantad-se, mar gallont, hebdale a zevo  
On enor hag on danvez, or feiz hag or bro,  
Ne chomo war an douar nag iliz nag aoter...  
War ho tillad e nijo ludu kroaz or Zalver.

Ra zeuy va zeod dirazoh da skorni em genou  
Ha va breh dehou da zonna, ma prezeg ar gaou ?  
Pariz o tivogedi, eun arheskob lazet,  
Re sklêr, siwaz, e tiskouez ne laran gaou ebed.

Ma vije da vihanna peurhreet an abadenn,  
Hag ebestel an dizurz diskaret da viken !  
Neuze, goude kalz daelou, e helljem ehana,  
Mez gwasoh eged biskoaz an droug 'zo o struja.

Nann, n'eo ket mouget a-walh glaou Gomor ha Sodom,  
Lakit ho torn warnezo hag e santfoh int tomm,  
Pa hwezo an diaoul, emaint beo adarre...  
Krena 'ra va izili : va Doue ! va Doue !

Ar Republik a lavar e hello dodn a-benn  
Da zerhel bleizi, deñved, e peoh war he barlenn,  
D'ober breudeur anezo, d'o has war al leton  
Evid eno, fri ha fri, glazeri o halon.

An deñved a zo deñved, kigerien ar bleizi,  
N'eo ket furnez o lakaad mesk ha mesk da beuri,  
Pa vo stag gand ar yeot ar paour-kêz penn-dañvad  
Ar bleiz a zaillo warnañ hag a evo e wad.

Deuet eo ar Republik diou wech en on touez

Atao diwar ar gounnar, fall-du ha divadez,  
Laerez, blasfemi Doue, laza ha c'hoaz laza :  
Setu e tri ger istor ar Republik kosa.

Hag en e gant teod maouez, birvidig em genou,  
Biken ne hellfen disklêria pegement a grimou  
'Zo bet greet gand ar hrah<sup>50</sup>-se a vuntras roue Frañs  
Hag a gasas d'ar chafod beleien ha noblañs

An eil Republik ivez, heñvel ouz he mamm griz,  
Lipouz e sunas ar gwad war mein ruiou Pariz,  
Kement a fank a vresas ma chomas 'barz ar pri ;  
Ne danas ket va lagad oh ober kaoñ dezi<sup>51</sup>.

Ar Republik 'zo hirio a zo mez he gweled,  
Eur barr tousigi arne war or bro 'zo skoet ;  
C'hwezet war o hrabanou war gorre an dorenn  
E kav dezo int gwazed... amprevaned n'int ken.

N'e' ket gand pri ar poullou eo e vev ar re-ma',  
Na gand nebeud gwenneien, tra, tra, tra, tra, tra, tra,  
Pa vezo bet eur rummad e teuy eur rummad all  
Ha gwaderezed nevez evid suna Bro-Hall.

Atao e vim ruill, diruill er revolution  
Rag or Republikaned 'zo heb relijion,  
Cheñchet or-beus daouzeg gwech e pevar-ugent vloaz  
Hag a-forz da ziloja emaom hirio en noaz.

N'ez eus nemed eur remed da droha on terzienn  
Doue en or halonou hag eun den en or penn,  
Eun den 've ar gwir gantañ 'vid mired da lared :  
Perag henez en uhel ha me ne vefen ket ?

E-pad pevarzeg kant vloaz ar Frañs 'zo bet euruz,  
Dreist peb bro anaveze t hounnez a oa nerzuz ;  
Pa lavare eur gerig, an douar a dave  
Ha pa zave he banniel, ar bobl oll a stoue.

Rag neuze ar Frañsizien a oa gwir zoudarded  
A zivenne an Iliz hag ar gwir dre ar bed,  
Neuze or-boa rouanez lejitim, ha kristen  
A oar hag enor stag ouz o drapo gwenn.

Ma vijeh bet ganeom-ni sant Lois, Herri pevar  
Er brezel-mañ trubuilluz on ledas d'an douar,  
Ketao, Bismarck ha Guillou, a-raog mond a Vro-Hall  
Ho-pije lonket houarn e-leh gwin ha kig-sall.

---

<sup>50</sup> ar hrah : ?

<sup>51</sup> dezi : gourel eo ar ger "Republik" er pennad. Amañ ez eo bet lakaet gwregel evel e galleg.

Nann, n'e' ket nerz na kalon a vank d'ar Frañsizien,  
Nnan, nann, netra ne vank deom, netra nemed eun den,  
Eun den a lignez uhel, ennañ feiz yah ha kre'  
Hag eun den d'or homandi ar gwir a-berz Doue.

Euz a wad Herri pevar e chom eur beradig,  
Euz a wad-se ken nerzuz, ken dous, ken pinvidig,  
Miret gan ar Providañs, ma vi, Frañs, adarre,  
Ar haerra rouantelez goude hini Doue.

Arabad eo argila, dre ma klevim krial,  
Bezom eur wech kaloneg, harpom ouz an dud fall :  
Herri pemp 'zo dirazoh, gantañ e vanniell gwenn,  
Hennez eo or gwir roue... Plas dezañ, Frañsizien.

(Bet savet gand **Jean-Marie Guillou** : Kleder 1830 – Penmarh 1887).

Notenn gand "Embann an Hirwaz" : Rei a ran e skrid evid an Istor. A-du e oa gand an noblañsed hag ar veleien a oa e penn ar gevredigez).

## Chanson nevez

*Kompozet war sujed eur himiad etre daou zen yaouank euz a eskopti Treger.*

War eun ton divertisant.

(**Notenn gand Embann an Hirwaz**) : eur bern geriou galleg a zo er skrid-mañ. Adskrivet int bet evel ma vefent brezoneg).

### Ar gwaz

Boñjour deh<sup>52</sup>, va Mestrez, deut on c'hoaz d'ho kweled ;  
Dioh ma leverot din, em rentot glaharet :  
C'hwi 'oar a-bell amzer pegement ho karan.  
Merket em-eus deh n'en de' ket a-vremañ.

Demeuz eur hostez all hoh-eus sur va zromplet,  
Ma ne deut hoh-unan eun nebeud d'am hared ;  
Seblantoud a ree din ne oah ket droug-kontant  
M'en em gavem eun tu asamblez o parlant.

Bet zo ganeom on-daou aliez preposiou,  
Testez vad oh ane, dalhit mad d'ho komzou ;  
Me 'vo fidel d'am ger, dalhit mad d'hoh hini ;  
An amzer a avañs, poent e' deom dimezi.

Ho pizaj, ho portred, ho teod, ho taoulagad,  
Ho furnez, ho tousder, ho komzou deread,  
O-deus greet em spered ker braz iñpresion,  
Mar deut d'am dilezel, e ranno va halon.

N'oufen petra d'ober red eo kleved brema'  
An arrêr definitif, va setañs diweza :  
Gwell eo mervel buan eged boud lañgisant,  
Bepred an esperañs, bepred en nehamant.

Roit din ma Mestrez, prontamant va arrêr,  
Ha soñjit kent e rei em-eus kalz ho karet ;  
Koñsultit ho kalon, soñjit n'ez eus hini  
Ho kar mui egedon, ha deut d'am hoñsoli.

### Ar plah

Doned d'ho koñsoli a houlet, va mignon.  
Ezomm am-eus a goñsolasion :  
Ganeoh e houlennin ar gras a houlennet,  
Ezomm on-eus on-daou da veza koñsolet.

Ho setañs a houlennit, plijet gand va Jezuz  
E tepante ouzin e rei deh grasiuz !  
Serten on ho-pije en ho tiskresion.

---

<sup>52</sup> deh : deoh.

Agreabl deom on-daou en dezir or halon.

Ma vijen-me mestrez demeuz va bolonte',  
Ma oa deh a choui<sup>53</sup> din dre neb difilkute :  
Me 'm-eus ho karet mad hag ho kar a vrema',  
Ranna 'ra va halon oh en em dispartia.

Med kent dispartia, me ho ped, selaouet,  
Ha grit réflexion war va ger eur momed,  
Doue a hourhemenn senti oh tad ha mamm  
Hag obeisa de' evid beza dilamm.

Int a zalh 'n or heñver plas an Aotrou Doue,  
Obeisom, p'on-eus digante ar vuhe'  
Kalz a boan o-desu bet o tond d'on elevi.  
N'e' ket just heb o gras-vad doned da zimezi.

Me 'gred bremañ serten ne dom ket destinet  
Da veza priejou assemblez uniset ;  
Doue 'ra deom entent e vouez dre o genou,  
Biken ne drañgresin sur e hourhemennou.

Ma reen heb o hras-vad eur marhad ker paduz,  
Em bez aon goude-ze na ven-me maleüruz ;  
Va houstiañs goude a rebeche din-me  
Em bez ho kemered hep koñje va ligne'.

Komzet 'm-eus ha greet komz en or faveur oute,  
Ha biskoaz 'n-eus gallet o zrei war an tu-ze ;  
Kerdit en asaurañs on-me ker braz fachel  
Ha ma oufeh beza, pa ne dint distroet.

Kement am-eus greet toud a zo bet inutil,  
Dimezi heb o hoñje n'e' ket difisil ;  
Mez hennez 'zo eun dra na rin birviken,  
War gement-se jamez ne dorrin o lezenn.

#### **Ar gwaz**

Eh bien, va mestrez, houmañ 'zo kalonad,  
A goust eun aboñdañs daelou d'am daoulagad.  
Va halon gand glahar a zo kazi rannet :  
Houmañ 'zo kalonad, goude beza karet !

#### **Ar plah**

Allaz ! va zervijer, m'ho-ped, na gredit ket  
E ven-me kirieg mar doh bet refuzet :  
Ma-bije-me gallet, hep terri al lezenn,  
Deuet d'hoh eureuji, serten en her grajen.

---

<sup>53</sup> choui : ?

Kement on glaharet ma oufeh-hu beza ;  
Emedi va halon war ar poent da ranna ;  
Braz eo ar sakrifis a ran-me da Zoue.  
Me 'gred e resevin ar rekoñpañs goude.

Me 'garje n'am-bije birviken ho kwelet,  
Pa ne hallan bremañ ho posedi bepred ;  
Dre va obeisañs ker a-walh e paeañ  
Va edukasion, va antre er bed-mañ.

N'oufet petra reet,al lezenn a gomand,  
Ne avañsin jamez heb o hoñsantamant :  
Brizom bremañ souden oll nerz on chadenou,  
Ha renañsom a-grenn d'on oll bromesaou.

En em zeparom pront, pa n'hellam koulskoude.  
Na chomom ket an eil d'aflija egile ;  
E leh all ni gavo eur re d'or hoñsoli,  
Rag amañ or glahar ne ra nemed kreski.

Kent ma pispartiim, m'ho ped, va zervijer,  
Eun daou pe dri souhet am-eus c'hoant da ober :  
Eur fortun gaer ha pront, furnez, madou, koantiz,  
Vertus, spered, menaj, famill ha yaouankiz.

Gras Doue ar bed-mañ da zond d'ho kenderhel,  
Hag er bed all goude ar joaiou eternal :  
Setu aze ar pokou ho-poa-hu goulennet,  
Biskoaz hini ne rois gand muioh a regret.

Ma karfe an dud yaouank ar re a ren er bed,  
Kundu o yaouankiz gand enor ha respet,  
E vefent oll ervad e dutañ o buhe',  
O kaoud an esperañs demeus a hloar Doue.

*(N'eus ano oberour ebed. Leun eo ar skrid-mañ gand geriou galleg).*



## Chañson ar big

*War eun ton añsian.*

Dimezelled an aotrou Tanguy  
O-devoa diou Big en o zi ; ;  
Desket o-devoa de' parlanr,  
Evid o divertisamant.  
Da vourk Plouyan e yeent da bourmen,  
Da weled o amezeien.  
Ar Big kenta euz aneze  
A yee euz eil ti d'egile,  
E-leh ma sante c'hoaz ar hrampouez :  
Hag e houlenne eun tammig  
Da zoulaji he halonig.

Allaz ! dre valeur ez eo bet eet  
Da di Jannet an Avelet,  
Evid goulenn eun tamm krampouez,  
Hag ivez eur bannahig lêz ;  
Mez an dirantez-se kruel  
He lazas gand eun taol spanell.

Moñstr ! da galon ne fraille ket  
Gand an druez euz he hleved  
O krial diwar bouez he fenn :  
Va buhez din, Aveledenn ;  
Mar dond fachel,ne deuin mui  
Da glask krampouez na yod d'az ti.

An dirantez n'e' ket bet kontañtet  
O veza ar Big lazet :  
Kemennet he-deus da vab Grall  
E rankje ober kemend-all,  
E rankje ober evelti  
Da big all an Aotrou Tanguy.

Yann an Hena, ni a zoñje  
E oas-te fur bete neuze ;  
Pa 'poa-te greet eur belevad  
E-poa keillet ar skudell goad,  
E-poa-te keillet en ti-forn :  
Chañs vad on-eus diwar da zorn.

*(Ano oberour ebed)*

## Gwerz truezuz

war sujed eur bugel yaouank

A zo bet tri bloaz dindan ar Pazennou 1881

*(War eun ton trist)*

Bretoned a Vreiz-Izel, tostait da gleved  
Resita en gwirionez ar pezh 'zo erruet.  
An oll a deuy da grena o kleved kement-mañ  
Mar hellan kondui va fluenn evid hen disklêria.

Kalz a draou 'vez disklêriet a-berz ar journaliou,  
Aliez 'rent ar gwirionez hag aliez 'rent gaou  
Mez ar pezh a zisklêrian a zo re hir, siwaz,  
Dizoloet e' ar hrim en miz Mae 'vid ar bloaz.

En eskopti euz Roazon, tostig da gêr Vitre,  
En eur barrozig vihan, heh ano Snt M'Herve  
'Oa eur familh tud fall, gand an diaoul posedet ;  
Mez evid o rekompañs ez int bet oll barnet.

Ar verh euz an ti-ze, eur plah yaouank kollet  
Gand eur hemener yaouank a zo bet debochet.  
A-benn eur pennad goude eur bugel he-deus bet  
E ti eun amiegez 'barz ar gêr a Vitre.

An amiegez o kleved he-doa brudou fall  
He dalhas 'barz he zi evid doned d'he diwall.  
Neuze ar bugel a zo kaset d'eur vagerez  
'Vid na vije ket brudet en he amezegez.

En-pad eiz vloaz ar bugel a zo bet o vaga  
Heb beza bet e vamm eur wech o weled anezañ.  
Ar hemener a bae ar miziou magerez  
Beteg n'e-noa klevet 'oa maro e vugel kêz.

Ar bugel a oa savet eur bugel dilikad,  
Neme ma ne anaveze allaza na mamm na tad  
Rag en-pad eiz vloaz e' bet en ti e vagerez  
Heb beza bet biskoaz oute nep seut anaoudegez.

Komprenit bremañ, kristenien,, petra o-deveus greet  
An dud kruel ha mechant gwaz evid tiranted  
Petra o-deus iñvañtet ober d'ar bugel kêz  
Pa zoñjan en dra-mañ, on leun a distidigez.

Ar vourrevien a deu da gondaou d'ar maro,  
O foaniou buan a base ne vent ket ker garo  
'Vel m'e' bet an inosant-mañ gand e dud kondaonet  
Da chom 'pad tri boaz en flachen en toull en eskred.

Eur voest o-deus preparet da lakaad anezañ.  
Leun a doullou 'barz er harr evid rei êr dezañ,  
Mez dirag ar vagerez 'deus ket kredet ober  
Mez pa int deut war an hent o-deus greet o afer.

Zn eur antren 'barz en ti o-deveus bet tennet  
Ar bugel paour deuz ar houfrag o-deus hen laket  
E-barz er forn eur pennad gante e' bet pozet  
Evid na vije ket o hrim dizoloet.

Eiz devez e-barz er forn e-neveus paseet  
Mez neuze o-deus soñjet an tri den milliget  
'Vije bet klevet e vouez gand tud o paseal  
Pez a lakaas ane' da cheñch plas dezañ raktal.

Eur havel bihan er hao o-deveus bet pozet  
Hag eun dornad plouz ed-du ennañ o-deus laket  
Gand eur goz roched da dad-koz ar bugel 'zo paket  
Ha da vond e-barz an toull-ze raktal e' kondaonet.

Oh, c'hwi tadou ha mammou, selaouit kement-mañ,  
C'hwi, ispisial tud tener a deuio da ouela  
O weled peger kriz e' eur vamm en andred he bugel.  
Gwelloh 'vije bet dezi rei dezañ an taol marvel.

En-pad eur miz ha tregont e' bet ar bugel-ze  
O soufr eur verzerenti ar vrasa en toull-ze  
Heb beza gouet gand an amezeien  
'N-eus ranket ar bugel paour soufr kalz a yenienn.

Peder batatezenn bemdez e-noa evid boued  
Ha dour ha gwinegr da eva pa 'n-divije sehed  
Ha ma dije ar maleur da glemm 'tije lavaret dezañ  
'Vije laket en eun toull en douar da vreina.

Tri goañv 'n-eus paseet ar bugel en toull-ze  
Hag e vamm en e gichenn kousket en eur gwele  
Heb na gemere ar plah-mañ truez deuz he bugel,  
Kollet 'oa gand an droug-spered ar vechantez kruel.

Mez ar mab demeurez an ti a deuas da gleñved  
Hag a-berz eur pennad goude e teuas da vervel.  
Diou deuz an amezeien a deuas da veilla  
Ar horv 'oa war ar varvskaoñ evid an noz kenta.

Hag int 'benn eur pennadig hag o kleved eur vouez  
Evel eur glemmadenn ne ouient deuz peleh,  
Hag int hag o lavared raktal en eur dehen  
An hini maro a remu ha koulskoude eet yen.

Mez allaz, an eil nozvez e klevent ar memez tra.  
Neuze 'deus anavezet mouez eur bugel er wech-mañ.  
Raktal o-deveus soñjet e oa an dud fall-ze  
O-devoa klenket o bugel en eun tu a-goste'.

Raktal eet, 'z egont d'ar gêr evid lared d'o zad  
Ha da rei anaoudegez deuz ar hrim efroyabl.  
O zadn pa 'n-eveus klevet, d'ar mêr 'n-eus lavaret  
Penaoz e oa en ti-mañ eur hrim dizoloet.

Pa deuas tud an ti-mañ deuz an interamant  
E oant chomet toud karget euz an etonamant  
O weled an archerien oh ober faksion  
Da hortoz an dud-mañ da renta de' rezon.

An archerien a houlenn deuz ar plah yaouank-mañ  
Peleh e oa he bugel oajet a unneg vloaz,  
Hag ar plah valeuruz-mañ a respontas dezo  
Penaoz e oa o vaga en eun ti ar ar mêz.

An archerien a respont : « c'hwi a lavar gevier,  
Ho pugel 'zo amañ pell a zo er mizer.  
Digorit deom an toull-mañ evid ma vo gwelet  
Hag eñ n'emañ ket amañ ar hristen 'peut ganet ? »

Mez an archerien kerkent 'vel m'o-deus digoret,  
O-demp e kouezont eno kazi evel semplet.  
Eur pennad mad ez int bet hep galloud kaozeal  
P'o-deus ar bugel en eur stad ken barbar.

Mez neuze e' bet tennet ar bugel ahane,  
'Barz en eur stad an trista a oufet da weled  
Hag ar re-mañ a zo bet war an eur garotet  
'Vid ma vijent da Vitre o-zri raktal kaset.

Ar bugel 'zo bet kaset 'barz en amezegez.  
Evel eur prosesion e tue tud di bemdez  
Evid geled anezañ hag ar plas ma oa  
E tered an dud bemdez evid her bizita.

Demeuz ar gêr a Vitre, deuz ar gêr a Roazon  
E tered an dud bemdez evel eur prosesion.  
Deuz ar gêr a Zant-Brieg, deuz ar gêr Bariz  
A zo bet eur bobl immañs o weled ar suplis.

D'an drizeg euz a viz eost eun ha pevar-ugent  
Ez int bet apariset dirag ar varnerien  
Er hours-d'assise en Roazon ez int bet kondaonet  
D'ar poaniou a welot amañ war-lerh raportet.

Deuz adaleg an tribunal ha beteg ar prizon  
E oa ouspenn tri mil den war ruiou a Roazon  
Evid gweled an tri-mañ o voned da juji  
'Tre daouarn an archerien an dud-ze iñpi.

Da nav eur demeuz an noz ez e' bet pronoñset  
An arrêr euz o setañs 'zo gand ar Jury greet  
An tad-koz da zaouzeg vloaz deuz a reclusion  
E wreg en-pad he buhez kondaonet d'ar prizon.

Hag ar vamm ken dinatur he-deus bet ugent vloaz  
Evid he funision rag meritet he-doa.  
Gwelloh e vije bet dezi mond bemdez da glask boued  
'Vid merzeria he bugel an hini<sup>54</sup> he-devoa ganet.

O ! c'hwi, tadou ha mammou, karit ho pugale  
Na 'h it ket d'o gwalll-dreti, grit atao vad deze  
Evid goude o maro beza rekompañset  
Gand Jezuz en e hloar en palez an Drinded.

An hini a-neveus greet ar resit a-nevez  
Na, war ar vezerenti demeus ar bugel-ze  
A oa 'barz en kêr Roazon pe e' bet an afer  
Hag e-neveus her rimet pa 'eur gavet er gêr.

E ano 'vel m'her gouzoh n'e' ket disanvezet  
Rag me a gred e partoud dre ar vro oll brudet.  
Eur baleour der ar vro Yann an Taov e ano  
A zouet deoh ar baradoz goude eur ar maro.

---

<sup>54</sup> an hini : pieni, er skrid orin.

## René Ar Braz. Genidig a Landreger Chañson an ostiz liper

*War don : Ar Filouter lin.*

Me ho ped, entrezoh, Bretoned, tostaet amañ  
Ha me a reio va oll bosupl evid resitañ  
Ar fars plezant 'zo arruet, egzempl eo er vro,  
Arrruet er bloavez prezant er barrouz Kenavo.

Goud a rit, pep hini ahanoh, n'eo ket permetet,  
Denomi anoiou an dud en chañson ebed,  
Me ho lez da zoñjal da biou ez eo kompozet :  
An hini a zant kaoud 'gav ell en em grafned.

Me a gomz demeuz eun ostiz a gare liped  
En kement skodenn 've ne di e veg da foured,  
Goud a ouie konta d'an dud flibez ha flabez,  
Evel-se 'tape bannahou en e blijadurez.

Pa 'n-ije servijet an dud er zal da eva,  
Eñ a lere eur fars bennag d'o divertisa,  
Ar bambocher a oe kontant euz a gement-se,  
Hag e lavar d'an ostiz : « Azezit da eva eur banne. »

An ostiz a oa eul liper, 'vel ma 'm-eus laret,  
Hag azeza gante ouz taol, se 'oa e zouet,  
Prezanti a ra e werenn deze hebdale :  
« D'ho yehed, ma zud, emezañ, evom eur banne. »

Kement boutaillad a deu raktal 'vez paeet,  
An ostiz a dastum arhant hag a ev bepred,  
Eur vicher demeuz ar vrava, se a zo plezant,  
Eva gwin demeuz e gao hag ouspenn touch arhant.

Ar re-mañ 'oa tri den yaouank, mibien deuz a di,  
'Oa eet d'en em divertisa d'an ostaliri,  
Keit ha ma pad o arhant ez int bet servijet,  
Entre nav eur euz an noz o yalh a zo padet.

Pa oa dispignet o arhant o-deus lavaret  
D'an ostiz rei deze "en crédit" c'hoaz eur voutailled,  
An ostiz a lavar deze : « Poent eo finisa,  
Avañset eo an noz, it d'ar gêr da loja. »

Unan euz an tri den yaouank en-eus lavaret :  
« Petra, emezañ, ma ostiz, leret ha soñjet,  
Abaoe eiz eur deuz ar mintin c'hwi a zo regalet ;  
Mar doh den brao, paeet bremañ dim eur voutailled. »

Raktal m' o-deus lavaret d' an ostiz paea boutailed  
En eur goler deuz ar vrasa eñ a zo antreet :  
« It e-mêz ma zi, e-mêz, partiet raktal,  
Rag me n' on ket desidet da rei deoh regali. »

An eil a lere d' egile, pa oent eet er-mêz :  
« Bemdez 'oar o teski skiant, kamaraded kêz,  
Goude beza greet onestiz ha kalz dispignet  
Pa eo bet lipet on arhant er-mêz 'z om taolet. »

Unan euz an tri den yaouank en-eus c'hoaz lavaret :  
« Tapet brao om gand an ostiz evel ma welet,  
Me a bromet deoh, war va ger, ha m'hen lavar seder,  
Me a zizono an ostiz da veza liper.

Me ho ped, va hamaraded,, disul ar beure,  
Da zoned da di al liper da eva eur banne,  
Ha prest goude me 'arruo en eur gariolenn,  
Dre ma ne houlennan ket beza anavezet gand den. »

E daou gamarad a 'n eme gav d' ar zul ar beure,  
Hag int da lared d' al liper : « Roit dim eur banne.  
Ni a baeo deoh en avañs, amañ, ho poeson,  
Hag evit ganim eur bannah, kanet dim eur zon. »

An ostiz a oa gwell-gontant ha rejouiset  
Pa 'n-eus gwelet e oa kelou adarre da liped,  
Mez ma 'n-ije bet gouvezet 'oa 'vid domaj  
E-nije bet o zervijet ha lezed o lipaj.

Setu arru or hamarad en eur gariolenn  
Heb beza bet eneb feson anavezet gand den ;  
Diskenn a ra en ti al liper, lojeiz a houlenn ;  
« Leket, emezañ, n' ho remiz va hariolenn.

Leket va marh er marchosi ha roit dezañ boued,  
Ha bezit bepred dizouet, pedet sur e vefet  
Kerhed euz va hariolenn din va valizenn  
Ma roin arhant deoh da gleñka prezañs daou den.

« Dre ne hallan ket partial deuz ahann fete',  
C' hwi a zastum va arhant din en sûreté,  
Kontet ane' ervad, ostiz, daou-hant skoed a zo,  
Ha pa 'mezo ezomm, ganeh me a houlenn. »

An ostiz a gont an arhant : » Ya, emezañ,  
Daou-hant skoed a zo aneze, evel a welan,  
Aotrou, me ho ped, da veza dizouret a ze,  
Me a lakeio 'braz em pres deoh en sûreté. »

An ostiz 'oa eul liper, an oll 'oar er vro,  
Mez a-hend-all e oa onest en e oll goñgo',  
N'e-nevoa ket ket disfiziañs euz a zen ebed.  
Se 'ra dezañ er momant-se beza bet tapet.

Keit ha ma oa eet an ostiz d'ar hao david gwin  
An aotrou n'eus ket amzer da ober e dro fin,  
An daou-hant skoed en-deus bountet en hodellou  
Ha laket 'barz ar valizenn mein en o flasou.

Pa arruas an ostiz gnd ar gwin er zal,  
An aotrou a bed anezañ da voned raktal,  
Da gas ar valizenn d'e bres ha retorn goude  
'Vid me-dejent ar blijadur da eva eur banne.

Pa 'n-eus alhwezet war ar valizenn,  
D'ar zal ez eo retornet, joauz 'vel peb den,  
An aotrou a lavar dezañ : « Evom eur banne,  
Ha kanit dem eur ganaouenn war eun ton neve' . »

E daou gamarad a lavar : « Poent eo finisa  
Rag warhoaz ar beure, aotrou, ni a deuio ama' ;  
Warhoaz ni gemero amzer d'en em eksplika  
War ar pezh on-deus lavaret amañ ar beure-ma' . »

An deiz war-lerh, deuz ar beure, arru an daou den,  
Ma houlenjont gand an ostiz hag e oa moyen  
Da gomz gand an aotrou an hini<sup>55</sup> 'oa 'n e di lojet :  
« Leret dezañ ' h om arru ha ni gwell-breset. »

An ostiz a lavar d'an aotrou : « Daou den 'zo amañ  
Hag a ziskouez beza preset, hervez a welan ;  
An daou den a oa amañ ganeoh deh, aotrou,  
O-deus c'hoant da parlant ouzoh evid aferiou. »

Pa arruas an aotrou er zal e oa saludet :  
« Boñjour, emeze, deoh, aotrou, ha c'hwi yah bepred ? »  
« Brao-braz on, eme an aotrou, yah, evel pep hini,  
Degasit dim bremañ, ostiz, friko d'on dijuni. »

An ostiz a zegas deze ha kig ha bara,  
Hag ivez boeson da eva, ne vanke ket netra.  
An aotrou a lar d'an ostiz : « It bremañ 'n ho tro  
Ha lest ahanom amañ sioul 'vid on afer. »

Eun hanter eru vad da houde o-deveus skoet,  
An ostiz a houl digante : Petra 'souetet ? »

---

<sup>55</sup> an hini : pehini, er skrid orin.



An aotrou a lavar dezañ : « Degaset bremañ  
Ma valizenn din ma 'mezo arhant d'ho paea. »

An ostiz a redas d'e bres, ya, hebdale,  
Degas 'ra gantañ ar valizenn hag e' bepred gê ;  
An aotrou a lavar dezañ : « Kontit, me ho ped,  
Goud a ouzoh 'oa 'neze en Frañs daou-hant skoed. »

Pa n'-eus digoret an ostiz ar valizenn-ma',  
Ne gavas 'barz en enni nemed mein da genta,  
Ma 'n em gavas en braz estonet, ha ma lar d'an aotrou :  
« Unan bennag a rank beza c'hoariet din an dro. »

An aotrou a 'h a en koler, dezañ e lavar :  
« Te, 'mezañ, a zo eur filou hag unan heb e bar,  
Mad e oa din kaved testou (me da wel ouz ar groug) »  
Paneved-se 'oen tremenet 'vid eun filou. »

An aotrou a zavas e vouez hag a lavar dezañ :  
« Te, 'mezañ, 'zo eur fripon, eul laer, war a welan,  
Me a ya da gaved ar Juj 'vid ma vi puniset,`  
An dud-mañ 'oar 'm-oa roet dit-te daou-hant skoed. »

An ostiz a lavar d'an aotrou : « Me ho ped  
Ne dekriet kat ma zi, me a zo tapet,  
Eur wech all me 'vo furroh, din eo eun egzempl,  
Ne dastumin ken 'barz em pres mein en plas arhant.

Roet ho-poa din da glenka deoh ho taou-hant skoed,  
Me 'm-oa o hontet ma-unan, hag em pres alhwezet ;  
Me 'rento deoh ho-taou hant skoed, netra justoh 'vid se,  
Ar holl a viran evidon, teom<sup>56</sup> oll gand se. »

Ar chañson-mañ 'zo eun egzempl d'an oll en añtier,  
Kenkoulz eo evid an ostiz 'vel 'vid ar bambocher ;  
Ar bambocher pa 'n-eus arhant a vez servijet  
Ha pa ve seh e hodell er-mêz e vez taolet.

D'an ostizen ez eo egzempl koulz ha d'ar re all  
Rag aliez e ve afer gand tud meurbed fall,  
Hemañ 'zo bet tapet, se a zo plezant,  
Kemer mein gand eur filou 'barz en plas arhant.

*(Kompozet gand René Ar Barz, genidig a Landreger).*

---

<sup>56</sup> teom : ? "touom"

# Son eun Den yaouank a zo bet trahiset gand e vrasa mignon

*War don : Me 'm-eus choazet eur vestrez.*

Ha bremañ pa m'on difich and nebeud a studi  
Me 'ya da zevel eur zon hervez ma fantazi ;  
Mez ket mond pelloh a-raog, me ho ped, Bretoned,  
Na rit ket din skouarn vouzar, gand se ma selaouet.

Me 'zo c'hoaz eun den yaouank, 'greder ket d'am homzou,  
Koulskoude gand ma hompar 'ouzon tenna planiou ;  
Eun ali 'm-eus da rei deoh, oll dud euruz,  
Tehet pell, mar ma hredet, deuz daou hent dañjeruz.

Ar hentañ gantañ 'zo hent ar mabig Cupidon,  
An hini<sup>57</sup> dre gomzou kaer 'n-eus tizet ma halon,  
Rag ma 'm-eus choazet da vestrez eur plah d'am fantazi,  
'Roan forz petra 'vo laret, ne garan nemeti.

Kenta 'm-esu bet an enor hag ar chañs d'he gweled,  
'Oa an dri zul a vez Eost, war dachenn ar Sklêrded ;  
He daoulagad a verve, he horv 'oa moan ha koant,  
Ne gredan ket 'ma he far 'barz an departamant.

Hi 'doa laret din traou kaer, ya, eno da gomañs,  
'Vid ma lakaad da veva, ya, war an esperañs :  
« Arsa, eta, den yaouank, poent eo dim kimiada,  
Rag tostaad a ra d'an noz, hag an hent 'izella. »

« Kenavo 'ta, ma mestrez, ha dalhet d'ho komzou ;  
Doue ar Mestr, mar plij gantañ, 'vim dimezet on-daou,  
Mez 'vid beza dispartiet, kredit mad ne vim ket ;  
Piou 'virfe 'vim eureujet 'med teodou milliget ? »

'Rabad eo dim kaoud anao 'barz on tud na 'barz den,  
Med on lezel en or c'hoant pa na houlennom ken ;  
Ma teufem 'benn da veva a-drugarez Doue,  
Ni 'zo sur da voud euruz 'hed an eternite. »

N'eus netra bet jouisoh evid an nevez-amzer  
Pa glever al lapoused peb leh dre ar harter ;  
Pa glever deuz ar mintin darn 'ne' o hragachad  
Hag an darn all o kana, darn all o c'hwitellad.

Setu aze eur skwer gaer, tud yaouank, 'vidom oll,

---

<sup>57</sup> An hini pehini, er skrid orin.

An hini 'welom bemdez, ' hetañ war par an heol ,  
An deiz all, dreist ar re all, leun a blijadurez,  
Me yeas d'an abardaez-noz beteg ti va mestrez.

Ne oan ket pell deuz he zi, pa harzez ma fasaou :  
Me a wele daou eostig, war ar memez bodou :  
Plijadur 'm-oa d'o gweled, muioh c'hoaz d'o hleved :  
Peseurt laouenidigez ! pried ha priezed !

Mez eur pennadig goude me 'welas ma mestrez  
Gand eur galon hlaharet, leun a dristidigez :  
« Yehed mad deoh, ma mestrez, ha joa pa ho kwelan.  
Me 'gav din 'peus poan spered pe hend-all oh bet klañv. »

« N'on ket bet klañv, den yaouank, poan spered n'am-beus-me  
Nemed eo red din senti ouz gourhemennnou Doue ;  
Ma zad en-deus laret din, deh, 'raog mond da gousked,  
Penaoz 'oa red ho lezed : henoz 'vin goulennet. »

« Souezet on, ma mestrez, pa zoñjan er pardon,  
An deiz-se ne greden ket e cheñchfe ho kalon ; »  
« Ne laret ket, den yaouank, m'on dicheñch-dicheñch atao :  
Mar piye kavet gweloh, 'vijeh ket deut en-dro.

Ha bremañ, me 'm-eus kaet eun den hervez ma hoant ;  
Ouspenn am eo eun den brao, ne vank ket dezañ arhant. »  
« Me ho kleo mad, plah yaouank, red eo din ho tilezel ;  
Me 'garfe beza en douar, er bed ne vin ket pell.

Kenavo deoh a laran, kenavo gand glahar ;  
Setu me wel eun tad-moualh pa vez o klask e bar ;  
Mez dre e vouez truezuz hag e gomzou tener  
Eñ 'zo sur deuz unan all, hag he have embarr.

N'eus ket mui a blijadur e-mesk ar yaouankiz :  
An tadou hag ar mammou hen divenn e pep kiz ;  
Ind 'dlefe dond da zoñjal emaint bet 'veldom-ni,  
Mez an oad a vir oute, ha n'hellont ket boud mui.

M'em-boa eur galon ken gê hag ar roz da viz Mae,  
Me 'gane, 'vel an eostik, er festou noz ha de',  
Mez setu on trahiset gand Bakus, va Judaz,  
Kement en-deus ma anavezet n'e' ket evid lared pas.

Mez joa dim waqr an douar, plijadur er bed all !  
Koulz eo dim-ni beza joauz 'vid 'n em daol da vervel ;  
Mar faot deoh goud ha kleved piou 'n-eus greet ar zon-mañ<sup>58</sup> :  
E ano eo Yann Boudig<sup>59</sup>, euz a barrez Kerien.

---

<sup>58</sup> mañ : bet skrivet "men" er skrid orin, evid ar rim.

## Chañson an dañsou

*War eun ton nevez*

*(Notenn gand “Embann an Hirwaz“ : Moullet fall eo al leor orin ; alese, meur a dra digomprenuz ; N’eo ket bet kopiet en abeg da ze).*





